

Journal

BRUD

ar Yez hag ar Vro

(4 niverenn ar bloaz)

Komanant-bloaz	20 l.
Komanant-skoazell	25 l.
Studieren, Soudarded	15 l.
An niverenn	5 l.

Renner-Tenzorier : P.-M. MEVEL, 14, Breiz-Izel, 29 N Brest
K. R. P. 1499-55 Roazon

Sekretour : A. MERSER, 6, strêd Beaumarchais, 29 N Brest
(Kas an dornskridou d'ar Sekretour)

Pêit ho adkomanant !

N'hellom ket moullan brezoneg hep arhant

Brud

ar Yez
hag
ar Vro

Niv. 26/27

GOUERE 1967

ARHANT, HOAZ HA SIWAZ	3
LOEIZ LEZONGAR	4
LUSKAOU, gand I. DIBREDER	5
ALHOUZ AR BARADOZ, gand AR BEG	10
IVONIG, gand R. GARGADENNEG	15
DIOU GONTADENN, gand HAUFF, lakaet e brezoneg gand E. AR BARZIG	19
KANAOUENNOU, gand F. DANNO ha A. DUVAL	49

ARHANT, HOAZ ha SIWAZ

9 Lur he-deus koustet dim pep skwerenn euz an niverenn 25, ha rasklet eo bet or hef ganti.

Red e vefe :

a) ma paeve pep hini e gomanant e koulz, da lavaroud eo pa'z eo merket war ar golo « Komanant echu » ;

b) ma kavfe pep hini eur homananter nevez ;

c) ma vefe kresket, siwaz, priz ar peder niverenn — ha lakaet da 30 Lur evid an oll dud.

Deoh, lennerien ger, da respont.

Ar sekretour, A. MERSER.

LOEIZ LEZONGAR

Savet zo bet eur romant nevez gand Ernest ar Barzig, LOEIZ LEZONGAR e ano. Evel pep tra skrivet gand or mignon, ez eo êz da lenn, plijuz ha dedennuz. Pa stagot ganti, e vloh poulzet beteg ar penn, ar pezh a zo eur perzh mad evid eun oberenn vrezoneg.

Ar yez a zo mad ha yah, liou Treger ha Mur warni.

Testenn ar romant ? Loeiz Lezongar, eur paotr yaouank anezañ, a zo kouezet e rouejou luziet diwez ar brezel 39-45. Klask a ra en em denna diouto, hag a-benn ar fin, e sav truez outañ e kalon al lenner.

Tud zo a hellfe beza feuket gand doareou-soñjal Loeiz Lezongar hag an traou a ra. Setu perag e vo embannet al leor gand E. ar Barzig e-unan.

Siwaz, e kousto ker : 30 Lur pep skwerenn, 144 a bajennou in-8°. Ne vo roet d'ar mouller nemed pa vo bet kavet 140 ragprener. Kasit 'ta hoh ano da E. ar Barzig, 26, av. du Cimetière-de-l'Est, 35 - Roazon (hep arhant).

LUSKAOU

gand Iwann Dibreder

Evid Edouard Gillouard

RAGSKRID

Les pages qui suivent sont-elles de la prose ou des vers ? C'est une question que je ne m'attarderai pas à trancher. Je ne les donne ni pour l'un ni pour l'autre, car ce qu'elles sont, comme classification ne m'intéresse pas. Ce sont d'abord des sentiments que j'éprouvais profondément, à commencer par celui d'écrire en breton, et voilà l'essentiel. Les exprimant, ou m'y livrant, en face de la forme à leur donner, je me livrai à une étude de rythme, et voilà le second point. Et voilà en Bretagne la nouveauté. Je n'ai pas cherché à faire œuvre poétique, — je ne me dis point poète. J'ai tendu plutôt à indiquer aux poètes de Bretagne que la forme de la poésie dans une langue doit être basée sur le rythme de celle-ci, et qu'il doit y avoir en langue bretonne une tout autre poétique que le sénile rabâchage bardique, scandé par un insupportable métronome.

J'ai fait aussi le plus grand effort pour user de toutes les ressources de la langue, et l'assouplir de force le cas échéant. L'anarchie de notre littérature autorise cet effort élaborateur.

Enfin, bien que je ne considère point Brizeux comme un si bon poète, j'ai ajouté à ces feuilles personnelles une adaptation bretonne en vers blancs basés sur le rythme, du début des **Bretons**, afin de montrer quel parti un poète d'un peu plus de tempérament que moi, pourrait tirer de notre langue, au fond ignorée des siens propres.

Chomet om an tostañ ar gwellañ ouz doare-skrivañ Dibreder, a oa tost-tre d'ar Skolveurieg a-vremañ. Skrivet on-eus ar gerioù kembraeg eveltañ. Gerioù zo n'om ket deut a-benn da gavoud anezo er geriadurioù. (Brud).

DEIZ DU

Hirio, deiz du.
Hirio, Gwener ar Groaz.
Du an amzer, glao e kouehel ;
Du ma ene, agarv ma neiz.
Hirio ne rin ket tra.
An hir-skrid boulhet,
E boulh e chomey.
Lenn ne rin ket
Lennein, e gwirionez, n'hellan.
Liherein, n'her grin ket ;
Liherein, siwah ! re 'm-eus her greet,
Levenez din dilannein ma halon,
Chañne marse d'an hani e skriven.
Nann, nann,
Liherein tamm ne rin.
Keveilen, pell ez oh, o! ken pell !
Ha pell erwalh, neoah, ne doh ket.
Keveilen... ha keveilen ez oh ?
Ahanon n'ah-eus ket d'ober.
Nann, hirio, deoh ne skrivin.
Re hir ho chañneet em-eus,
Hirio en ho leskein sioul.
Ha petra rin, neuze ? Pedein ?
Mad e vehe, da Wener ar Groaz.
Neoah, evidoh e vehe, e pedehen,
Nameid evid senteïn en izel
D'ur c'hoant kuh anavet ganeïn,
Ur c'hoant kuh doh ho re-c'hwi,
Gwall-guñv din senteïn d'ho c'hoant-c'hwi.
Pedein else, neuze ?
Marse.
Meid tuchant ;
Devehatoh, ha nann amañ.
Pa gaerikay un tamm an amzer
Eh in d'ar vered diamen
Leh m'ema beret ma zud-me,
(Pevar hoah, doh c'hweh eh om bet !)
Eh in d'an iliz koh tavel
Savet gwerz a zo 'kreiz dehi.
Pedein, — aze, marse. Ha nann amañ.

Amañ, bremañ, petra rin ?
Amañ e choman, dalhedig.
Amañ bran er gêr e choman,
E selled doh ar glao e kouehel ;
Glao du ar vleu gwenn-kann imbril,
Neñv du a-uz d'ar glazadur yaouank,
Ha du ma ene.
N'eo ket an amzer e laka du :
Du e oa kent.
Hirio : ma meiz agarv, c'hwerv ma halon,
Hirio, pell doh pep tra.
Levriou, serret e chomeet.
Levriou, divlaz eh oh hirio.

En ho touch, neoah, un a welan,
E sellan prederiuz dohton.
Ar peh a zo barh, a ! her gouian !
Barzonegou ar varzed a Gymru,
Pegen liez em-eus ho adlennet !
Hag hirio hoah en ho tigoran,
Hirio, ha c'hwerv ho tamlennan.
Hen barzed, barzed doh or gwad,
Barzed nerhuz, a spered uhel...
Llyvarh Hen, Aneurin, Taliesin,
Ha Gwalhmai, hag Howell ab Ovain ;
Ha Kynzelou, Lyvarh ap Llevelyn,
Elidis Sais, Caradoc Lancarvan,
Prydyz Bihan, Einion ap Gougan ;
Ha Gruffyz ab Meredyz,
Ha Davis ap Gwilym, ken ledan ;
Iolo Goh ha meredyz ap Rhys,
Ha rah ar re all da heuli :
William Llyn ha Morris Gyffin,
Salesbury ha William Morgan
Hag Ellis Wyn o Lasynys, ken gwelour,
Ha Theophilus Evans, ken skriver ;
Iolo Morgang, a zizolas ar re gentañ,
Ha Goronvy Oven, di-argant,
E vehe ket ken braz gand goarou,
Ha n'hellas ket kemer e beurnij.
Penaoz ne ouiehen ket hoh anaou, o c'hwi rah,
Ken liez el em-eus o gwelet,
Ken uvel lusket d'o lennein...
Meid an amzao eh oh da lenn, siwah din !

A ! siwah ! e gwirionez.
Siwah, pe diou weh siwah !
Hen barzed ha breudeur eh oh c'hwi,

Ha naren or hen barzed-ni !
 Nann, naren, hen barzed Breiz-Vihan.
 Ar yez ho-peus miret, kanerien,
 Ar yez ho-peus meret ha miret,
 Siwah ! n'end eo ket anehi on hani-ni.
 Kar d'on hani ema, e gwir ;
 Meid n'end eo ket on hani-ni.
 Siwah, hen barzed or bro-ni,
 Petra zo deut ag hoh ober ?
 A ! kollet int bet, a! glahar !
 Kollet int ha kollet da vad.
 Roget oll en dorn-skridou,
 Heb levriou koh ema or yez,
 Hag ema deom el a pa vehe
 Goulle an amzer bet...

Ar pez a rin hirio,
 — Hirio, garv ma halon ha du ma meiz, —
 Ar peh a rin e vo
 Skrivein.

E yez mem bro, skrivein,
 E yez men gouenn
 E yez men gouenn, oberein,
 E yez mem bro.
 Chomet eo darn en hir-skrid
 E oen war e dro 'vid ar sihun ;
 Ha n'on ket 'vid her henderhel
 Hirio, deiz du.
 Meid un arall, avad, e rin.
 Ne vern ha braz pe bihan e vo,
 Ha brao pe treuz :
 Atao e vo.
 Mem bro, mem bro, duvedig !
 Da yez, duvedikoh !
 Flastret oh bet d'an tonkadur,
 Izeleet ha mehekeet !
 Treiset oh bet d'ho mibion,
 Gwerhet gante, zoken, gwehave.
 Mem bro, n'ho tilezin ket.
 Ganeoh, mem bro, e choman,
 Hoh ene, mem bro, a servijin,
 Ho yez.
 Dohiti e chomin felan,
 Dehi men divreh hirêhuz,
 Dehi, greduz, ma hêh fenn.
 Gwel-bennou a zo war ho touar, mem bro,
 Meid d'hoh ene n'int ket felan, ar re-se ;
 Liez, treiset oh bet gante,

Ha gwerhet.
 Ma hani-me, mar deo dister, chomel a ray,
 Da heuli ganeoh el ur hi du,
 Ur hi braz du ha melen
 Dare kaer da sentein d'ho kemenn.
 Glaharet eh on doh ho kwel,
 Mem bro, ma yez,
 Glaharet, ha gloazet,
 Muioh evid ma gwella un den,
 Ken gloazet
 El e kavan anken,
 Anken braz ha prederiuz,
 Da venn-arhoarh,
 D'an amzeriou da zond.
 An anken ma loska el ur ra.
 El gand ur ra ema debret men diabarh.
 Ha kement-se,
 A pa veizan ennoh, ma yez,
 Ha kement-se,
 Gand an anken war ho tivoud, mem bro.

Hogen an amzeriou da zond,
 Ar re-se nen dint ket hoah.
 Ha me, hirio, me oar, eh on.
 Me, hag eh on,
 A-benn hirio,
 An amzeriou da zond e tarparin.
 Keveilen,
 Ahanoh-c'hwi n'on ket briel,
 Ha dond da voud briel n'hellan ket,
 Meid a mem bro briel e vin,
 Dre nerh gober.
 Ar peh a rin hirio, ken garv !
 Ar peh a rin, che 'ma eañ mañ, keveilen :
 Ar peh a rin :
 E yez mem bro, skrivein.

ALHOUEZ AR BARADOZ

gand Ar Beg

Ar Barz

E-pad ma strak ar balan hag e stran poull ar ran,
Mar deo gwir henwerz Wenhlan, e Breiz, henoz, e kan
Tud ha laboused, bodet (ne laran ket ar vran)
Da veuli Taran, Orged o tridal war an Tan.

Kanom eta, a-gevred, laouen, savom or mouez
War-zu an Heol benniget a skign warnom e wrez.
Kanom, oll, ol levez dirag ar gwella tad
A denn, puill, pinvidigez diouz nebeud-tre a had.

Ar gwir Gillog (Labous Belen)

Na bravad reiz-reiz ar strink-heol war glen, Breiz
Pa zishill-eñ, e-leiz, karantez er mêziou !
Pa c'hoarz ouz pep reiz goret e-mesk bleuniou,
Na bravad reiz-reiz ar strink-heol war glen Vreiz !

Krapveg (an toud, ar gaouen)

Din, e plij ivez kened, stergann a-uz d'an noz
Pa fistill poull ar raned, pa zifoup fri ar hoz.

An drask

Peoh, Bugel-noz, teh, Krapveg, kê war zolier ar hraou
Da zelaou son ar raneg e-ser hija da laou.

Bodet ez om-ni amañ da gleved Abegawr,
Na zispleg gour eveltañ, dres, an diougan-aour
Karantez, leiz e vruched, a zoug evid e vreur
Ha truez ouz al loened a vev en-dro d'al leur.

Abegawr

War da benn, « Turier-Douar » hegar ha mao e par
On heol, peurvuia klouar ; rag-se, yah, skañv da har,
Chom war frank da drevelli gand da varh ha da gi
Pa n'eer ket re striz ganti e-barz « kuz-heol an ti ».

Amañ, ne houl den mervel na kennebeud mond pell,
Kuit, diwar-dro ar havell, tusa d'ar hêriou-trell

War-lerh plijadureziou, e-touez tud a bep liou
A heñchfe d'ar galeou kentoh eged hebliou.

Pa skoill karr-wig an Ankou, gand re zamm (mad ha fall)
E weler hiniennou, e-leh mond d'ar bed all,
O tistrei da Landelo. Neuze, goulit, hep aon
Dirag spes an den maro : « Hag e fell d'an Anaon ? »

Ar Gwir gillog

Klask a ra on henvarzed, (war an oaled bepred)
Sanka, e-barz or spered, hengouniou, kaer-meurbed
Evid ne ray ket dilez, Breiz-Izel, diouz he yez
En desped da dud diaez aliez « tud al lez ».

Abegawr

Dav eo, ganin-me, meuli va farrez, Breiz a-bez,
D'am ene brasa dudi ez eo kana, hep mez,
He zoniou hag he gwerziou aozet gand on tud koz
A-zivoud on henvoaziou, trouz ar mor, brug ar roz.

Ar Gwir gillog

Na kaerad reiz-reiz, heol kreiz-deiz war hlad Breiz
Pa led on gor war-hed saon don ar prajeier !
Pa drid ouz an ed eosted er parkeier,
Na kaerad reiz-reiz heol kreiz-deiz war hlad Breiz !

Abegawr

Pebez tonkad d'ar bugel peuzsavet yah ha mad
Pa rank kuitaad Breiz-Izel, dilezel mamm ha tad !
Eet « war an tus », en harlu, (hep chans, hep kenavo)
E varv ped straker brulu skoet gand « droug ar vro » ?

Orgedig (a vouskan)

Dindan Heol an Inizi nag a zouarou krin
Eno ne helle pleuñvi lapousig ebed din.

Abegawr

E-giz didu d'ar spered n'eus nemed turlud hin
Peogwir, e tro ar yehed dalhmad war an tu hin.

E-mesk an harluidi, em-eus gwelet tud fur
O vond, a-drag, e belbi gwintet kuit paol o stur,
Daoust ha n'eo ket eet, 'wechou, va spered dreist ar harz
O klask rima hirvoudou da gana gand ar barz ?

Hirvoudou

Nag ez eo kuñv hounaidigez
Diouz parrez koant va ganidigez !

Ma c'hoar, ken yah e oa heol c'hoao
Pep devez
A-greiz kalon, dit, Breiz, ken brao
Atao !

Miroud a rez koun : Or mamm garet,
Koazet êz war gorn an oaled,
Ganti, war varlenn, ni, daou vennig noillet,
O c'hoari mailla he bleo gwenn ?
Kaerad penn !

Bez e teus hoaz koun diouz an Drinded
Ha diouz ar groaz e-kreiz ar vered ?
Ped gwech em-eus ar « bign ha baon-

Baon », brallet,
Pe, tintet, siwaz ! d'an Anaon
Laz-kaon ?

Gweled a ray hoaz va daoulagad
Hensal Mamm-goz, liorz an ollvad ;
Feunteun ar Zant, dindan ar skao :
o vouzad
Breiz, frank ha drant, a-bez war zao
Brao-brao !

Ar Gwir gillog

Brao-brao ! evel atao, e vez heol goude glao.
An neb a ver gand daou bao a chaoko c'hweg ha mao.

Abegawr

Va mennad, kaerad mennad ! Deuet, da wir avad !
Sell, dirag va daoulagad Landelo ha tud vad !

Evel gwechall, e welan, diwar dreuziou ar gêr,
Bruhu ar roz e valan skeudennet war ar stêr.
Kleved a ran o vralla, o vruda lid moarvad,
Pevar gloh, gwir. Ar brasa ez eo fillor va zad.

Laosket em-eus hin drastuz, amzer vreïn 'dreñv va hein
Hirnez, doan, boued divaguz, chomet ez int ouz drein.
A-vremañ, e fell din-me, mond a zehou hag a gleiz
E-ser sevel bugale ken yah, ken kreñv ha reiz.

Euz avel yud, dirollet diwar lein Sant-Mikel,
Ezomm, brao-tre, gwaskedet e-barz liorzou-kael
(Pallennou strad eur helhva e skalf menezioù du)
Er brava leh da vleunia gand koajou e pep tu.
N'eo ket braz ar vourhadenn, med, enni, nag a dud !

Evel gwenan, er ruskenn, o fraoñval, en o brud.
An neb a dorr e zehed gand died ar zant hepken
A vern bloaveziou yehed, da veteg kant zoken.

Ar Goulm

Kredit anezañ, kêriz, trelatet gand an trouz,
Pe warnoh « droug Sant Langiz », gwalenn ar stradou louz.
Deredit en or hichenn hag e teufot a-benn
Da vond dibill ha laouen, dibistig, sonn ho penn.

Degasit ho pugale kaztizet gand al leh.
Aamañ e kavint pare hag e kollot ho neh.
Ya, war yeot tous ar flourenn pe e penn ar bern foenn
E lipot ar grampouezenn re bar d'ar bara gwenn.

Abegawr

Ni, on-eus daou henwele. Brudet ez int o-daou ;
War wel, ya, e pep mare. Ne lavaran ket gaou.
Ar henta, eur mell laouer, gwall-galet d'an den paour.
Bet eo bet, e lavarer, aozet da vab ar hawr.

D'ar Zent e vez kinniget pa dremenont hebiou
Ennañ, hep pell na dumed e kouskont gand ar riou.
Rambreet o-deus warnañ tadou an dihell veur :
Sant Telo ha Sant Erwan... 'hend-all n'eus ket nemeur.

Tre ma kastize Telo e gorv war e vên-gomm
E kousked c'hweg e garo, er hoad, tost d'ar stêr-blomm (1)
Mard e oa kalz, kalz brasoh gwele ar reder-skañv,
Bez e oa, ivez, blotoh, dreist-oil e toig an hañv.

War henwele ar haro morse n'eus kavet bod
Na bleiz na Gouill-Garo. (Bet krouget ouz ar bod)
Etre Vae ha Gwengolo, bep sul, evel gwechall,
Ez eer dindan an derv da ziskuiza, gand mall.

An Toud (Krapveg)

An neizeur d'he zervijer e harme God Sant-Hern :
« Mar deo toull va zavañjer n'eo ket roget gand spern. »

Orgedig

A-uz d'he fenn e kane, e-keit-se ar Goukoug :
« Na ouelit ket, e-giz-se, peogwir n'eus ket a zroug. »

Ar Goulm

Eet da bedi Sant Telo, penaoz Godig Sant Hern,
Eur verh fur, war he meno, he-deus « foaraet ar stern » ?

(1) ano ar Stêr-Aon e Landelo.

Orgedig

Eet e oa (hi, ken tener !) da heul marhig Kerloup,
Gwiader euz e vicher, maill da zirosta stoup.

An drask

Evel-henn, e Landelo, e meur overenn bred,
E-barz iliz Sant Telo ne weler gwaz ebed.
Hogen, e koad ar Haro, a-dreñv kein ar groaz ruz,
E kaner, e-giz kredo, son ar glaskerien lus.

Orgedig (war don ar bal-dañs)

Kutuill a ran eur hornad lus }
Da rei da Vargodig, dre guz } diou wech
Margodig va dousig
Ro din-me daou vouchig
Dem on-daou Margodig
Da c'hoari chakodig.

An Drask (war eun ton dañs)

Sed aze ar vrud a reer da baotred Landelo
Gand o jiletennou berr o begel dizolo.
Furikerien deuit, e-leiz, silwing ar ververo,
Marteze e kavfet neiz koukoug koad ar Haro !

Abegawr

Sevennoh an degemer e ti « Soaz ar Fell Goz »
Rag eno, c'hweg, e kousker e-barz eur gwele kloz.
War-lerh gwella chervad aozet e giz ar vro.
Meudit pemp real skodenn ; mousc'hoarzit : Kenavo !
Dirazom a-hed koajou, e goueled he zaon hlaz
Etre diou seizenn vleuniou e vored ar stêr vraz.
Dinaoui a ra, plijuz, boull-kaer ha war he fouez
En eul leh beo, meurlivuz, gand anao, leiz ar gwez.
Hi, strinket diouz lein-Arre, dreist rehier, bern war vern,
A hrozo war hent Kerne gand an diaoul hag e gern.
Ahann, en desped dezi, ez aio, lamm ha lamm,
D'ar mor braz d'en em veuzi med hep dihanna tamm.
Maga a ra Aon pesked, lipous, saouruz meurbed !
Deuit da dañva he dluzed. Gwelloh n'hoh-eus ket bet.
Euz unan euz heh eoged e tennot meur a bred.
N'eus enez all, er gwasked, ken emzao war ar bed.
Pa welot Tour Landelo, n'it ket faeuz hebiou.
Soaz ar Fell Goz ho mago eur zizunvez pe ziou
Ha, gand « debron ar gouzoud » pa viot heget da vad
Klaskit an tu da gleved Per Delo en e stad.

IVONIG

gand R. Gargadeneg

Ivonig a oa ar yaouanka deuz ar baotred deuz eur gêr
e-kichennig Goulien. Hennez a oa deut eun diaoul a
baotr, ne glaske nemed ober taoliou sotoni evid lakaad
an dud da c'hoarzin, med eun dra na gare ket eo mond
da ziwall ar zaout. Pa veze hoaz bugale all da c'hoari
gantañ, neuze ne lavaran ket, med pa ranke chom en
e-unan ? Laosker a ree ar zaout er park hag e yee war
gostez an aot a oa e-kichenn. Atao e veze eul linenn, hag
eun higenn e penn, ha boued a veze gantañ ive.

Pa veze taolet al linenn er mor gand Ivonig, ne zoñje
mui er zaout, hag ar re-mañ a yee da laerez e parkeier an
dud, setu e teuent da glemm da dud Ivonig. Pa deue ar
paotr d'ar gêr, e dad a denne e lerenn deuz e zargreiz
hag e taole war foñs Vonig, med ne oa netra da ober : ar
peskerez a oa kreñvoh evitañ.

Eun devez e oa eet adarre da ziwall ar zaout da
gichenn ar mor. Lavaret e oa dezañ : « Chomit gand ho
saout ! » Med an dra-ze a oa dizonjet ha Vonig adarre
war ar garregenn hag al linenn er mor. Ne oa ket bet pell
e santas eun taolig, hag eñ tenna al linenn er-mêz ha
teuler anezi eun tammig pelloh. Ken e welas al linenn o
vond da vêt. Vonig a sache gañtan, ar muia ma helle, med
a linenn a sache anezañ. « Ma, a levere Ivonig ; ha c'hoant
e-neus da sacha ahanon er mor ? » Setu ma kavas eur beg
karreg tost dezañ hag a droias al linenn en-dro dezi ; dre
ma sache war al linenn, Vonig a droe anezi en-dro d'ar
beg karreg ha da dammig da dammig e teuas a-benn da
denna al loen er-mêz. Eur sachadenn hoaz, ha 'ma deut
war lae !

Med neuze ar paour-kêz Vonig a oa bet spontet. Eur
mell silienn hir, digor braz he genou ganti, prest da zail-
lad warnañ. Ne ouie ket petra da ober ; barz fin e welas
eur mell tamm karreg, a gemeras anezañ gand e zaou
zorn hag e sklapas war benn ar zilienn. Diou wech pe
teir gwech e rankas ober e-giz-se barz he laza. Neuze
Ivonig a zammes anezi war e gein, ar penn a deue beteg
e benndaoulin hag al lost a skleje war en douar.

Pa erruas beteg ar park, tamm saout ebed. Eet e oant
adarre da laerez, pe d'ar gêr ; ha Vonig a yee ive. E oa e
hortoz al lerenn gand e dad pe gand e vreur, med pa oa

gwelet ar pez a oa gantañ war e gein, den ne lavaras ger ebed. E vamm a deuas neuze deuz an ti hag a jomas mantret dirag he mab. « Ma faotrig paour, penaoz oh deuet a-benn deuz eur seurt loen ? Ker buan e-neze tennet ahanoh er mor hag e vefeh bet beuzet ! Deut ma mab da chañch ho tillad hag it dioustu da Waïen da werza ar pesk-se, hag ho-po mouni mad deuzoutañ ! »

Ha Vonig a yeas, kontant da werza e besk, ha gwerza mad e-noa anezañ, ha fier e oa d'ober arhant d'e vamm...

Ivonig ne veze ket evurusoh morse ken pa helle c'hoari e-barz an tarz gand ar paotredigou all. Aze e oa mestr war an dachenn.

E vreur a deuas eun deiz d'e glask, deuz lae an hent e halve anezañ « Vonig, deus dioustu ! » Med Vonig a ree skouarn vouzar, ma rankas e vreur dond beteg an draonienn d'e gerhed.

Ar wiz a oa da gas d'an oh ha Vonig a reked moned ganti. « Diwall, a levere e vreur, pa vi e toned d'ar gêr, deus ganti war-bouez, klevet a rez, a-ziwar-bouez ! Diwall e ve c'hwez warni pa errui amañ ! »

Setu ma kemeras Vonig an hent gand e wiz. Med al loen ne oa ket êz da gas. Mond a ree deuz an eil d'egile deuz an hent, a-wechou all e yee a-diz, ma renke ar paour-kêz Vonig galoupad war he lerh. Skuiz e oa ar paotr ; hag ar c'hwez a zivere bill-bill euzoutañ. Kaer e-noa sacha war ar godenn, ar wiz a oa kreñvoh evitañ hag a sache anezañ ganti. Barz fin eh erruas e Trohalu, eur gêr deuz parrez Goulien. Mestr koz an ti a deuas d'e gaoud. « Ton Jan, lavaras Vonig, ma breur e-neus lavaret din kas ar wiz amañ ». « Mad, ma faotrig, a respontas ar mestr koz, kerz da c'hoari gand ar vugale aze, ha pa vo prest me a halvo ahanout. »

Ha Vonig da c'hoari. Evid dezañ beza skuiz, ar c'hoari a yee war-raog toud ! A-benn eur frapad goude-ze e teuas ar mestr koz d'e glask. « La, Vonig, prest eo, bremañ e renkez mond d'ar gêr. Med kerz goustadig ganti ! »

Vonig en em lakaas en hent ; ma oa tiz war ar wiz o tond, bremañ ne felle ket dezi bale, ha Vonig trohi eur bod banal evid he fusta, med ne yee ket kentoh anezi, ha Vonig a yee droug ennañ, « Loen lor, zoñje ar paotr, me bari tuchant me a zreso ahanoh. » Ha Vonig ober eul lamm war he hein, ha ya ! Ar fust a yee a-raog, ar wiz spontet a denne ganti ar muia ma helle, ha Vonig a starte mad e zivisker evid chom a-haoleg war he hein. Setu ma oent erruet er vourh. Ar wiz a zifonke hag a ree reuz, ha Vonig

a choue ya ! hag a fuste atao. An dud a zirede er-mêz deuz o zier. « Petra zo, petra zo ? » hag a zisvantent da c'hoarzin. « Sell 'ta, Vonig war ar wiz, Vonig war gein ar wiz ! » Penn-da-benn gand an hent ne gleved ken nemed c'hoarzedeg.

Med pa oa erruet e-kichennig e gêr en em laoskas da goueza, hag ar wiz a yeas en heh-unan d'ar gêr. Ar c'hwez ruz a oa warni, ha difonkal a ree. « Petra a zo c'hoarvezet gand ar wiz, a levere ar breur koz ? » Ker buan e oa Vonig ive e-barz al leur. « Deuz p'leh emout o tond, ha penaoz emañ al loen paour-ze ken kastizet ? »

— Al loen paour, a leverez ? a respont Vonig, kemend-all a vizer am-eus bet ganti, koulz da vond e-giz da zond en-dro... an diaoul zo warni mechans : evidon-me ne din mui ganti da Drohalu a-walh em-eus het ! »

Eun devez bennag goude-ze e oa ar zul, ha Vonig hag e dud a oa eet d'an overenn d'ar vourh. Pa oant erruet e oa kalz tud e-kichenn an iliz hag ar gaoz a yee war-raog. « N'ho-peus ket gwelet an devez all ? netra kaer-roh, n'eus bet gwelet kemend-all morse : eur c'hoarzedeg penn-da-benn gand an hent. Vonig war gein ar wiz, hag e fuste, hag e fuste, e-giz posubl e vefe bet e tenna kourse. Klevet a rez, Kled ? A ! bet az-peus eur breur digourdi 'vad !... Vonig, penaoz emañ da wiz abaoe ? Diskuizet eo ? »

Vonig ne responte ger hag a stoue e benn. « Setu aze, a levere Kled, bremañ e komprenan perag e oa al loen paour ken helhet ! Ma n'eus ket moien da ober netra gand ar paotr-ze... ne ra nemed ober sotoniou. »

Med goude an overenn, pa oa deut Vonig d'ar gêr, e-leh kaoud merenn, eo al lerenn e-noa paket !

DIOU GONTADENN

gand HAUFF

Lakaet e brezoneg gand E. AR BARZIG

KONTADENN AR FLORIN ⁽¹⁾

Gwelet e vez hoaz er rann uhella euz ar Souab mogeriou kastell Uhelzouar a oe an hini kreñva diwar-dro. Pintet eo war eur grehenn zonn, med plên a-walh war he gorre. Alese e hell an daoulagad para gand plijadur a-uz d'eur vro divent. An tiegezh Uhelzouar a oa doujet en trowardroiou-ze ha, 'zo kaerroh, kalz pelloh. Anavezet hag enoret e oa an ano-ze a-dreuz Bro-Alamagn a-bez.

Ahanta, bez ez eus kantvedou, da vare m' eo bet anavezet ar poultr-kanon, e oa eun aotrou Uhelzouar o chom er hastell-kreñv-ze. Iskiz a-walh e oa e zoareou. En tu-hont d'eun toulladig mevelien ha mitizien, ne oa ket stank an dud o-doa klevet anezañ o terhel kaoz. Pa ziskenne en draoñienn war gein e varh hag e tigoueze gantañ keja gand unan bennag a zalude anezañ hag a laoske kreiz an hent gantañ en eur lavared : « Deiz mad, aotrou kont, brao eo an amzer », e responte eñ : « Ba ! kahaj ! » pe « Gouzoud a ran 'deo. » Dond a ree da veza eun den gouez pa gave dezañ ne ree ket e vitizien hag e vevelien diouz o gwella evitañ hag evid e gezeg, hag ivez pa veze red dezañ gortoz dreg eur harr bennag a stouve dezañ e hent. Neuze e veze klevet o vallozi gand leou Doue, ha re hroz.

Ar gontez, er hontrol, a oa eun itron hegarad ha seven, dezi eur minhoarz ken dous hag eun devez a viz mae. Mamm ar beorien e oa ha netra ne vire outi, na gwrez nag erh, da ziskenn diribin rust toseñ ar hastell evid mond wardro ar re baour pe ar vugale glañv. Ha pa gave he gwaz anezi o vond evelse dre an hentou, e hroz-mole : « Gouzoud a ran 'deo ; ba ! kahaj ! » hag e ree d'e varh skarza pelloh.

(1) Ar ger-ze a zeu diouz an italianeg « fiorino », pe aour a zervijas da genta toud e kêr Florañs, ha dond a ra "fiorino" diouz "fiore" (bleuenn) o veza ma oa war pezh bleuniou lili, ardameziou ar gêr vrudet.
Diwezatoh ez eo bet implijet ar ger florin e meur a vra euz Europa ha graet e vez gantañ hoaz, da skouer, e Broz-Zaoz.

Kalz a vaouezed a vefe bet digalonekaet gand kement a rusteur ; unan he-defe soñjet : « Perag, ober wardro ar beorien, peogwir e kav d'am gwaz ez eo eun dra diod ; darn all a vefe deut da glouara ouz o fried ha zoken da gemer kas outañ. Med an itron Hedwig a Uhelzouar ne reas evel hini ebed aneze. Dirhel a ree da gared he den ha d'e zouja, da dremen he dorn gwenn war roufennou e dal rouz. Pa zeuas Diter, ar beskонт bihan, war an douar, e reas e vamm war e dro gand kalz a garantez, med e dad ne glaske morse gweled anezañ. Beb sul, goude pred kreisteiz, ar vagerez a zeue da ziskouez e vab d'ar hont. Selled a ree outañ eur pennadig mad en eur hrozmolad hag e rente ar babig d'ar vaouez. Bez he-doe homañ eur florin an deiz ma hellas an hini bihan balbouzad « tata », med hemañ n'en-doe ket zoken eur minhoarz.

An deiz ma tapas e dri bloaz, e dad a lakeas gwiska dezañ dillad kaer, voulouz ha seiz, hag e vragou kenta. Neuze e lakeas dibra e varh du hag eul loen ken kaer all. Kemer a reas ar paotrig war e vreh hag eñ da ziskenn ar vins vaen kammdroenneg, ha klevet e veze e gentrou o stirlinkaad. An itron Hedwig, sabatuet, a redas warlerh he gwaz : « Gweled a ran, aotrou kont, emaoch o vond d'ober eur valeadenn war warh... »

Respont ebed :

« N'oh ket memez tra o vond da gas Diter ganeoh, me a oa o tañsen kas anezañ ganin da vale.

— Gouzoud a ran 'de, a eilgerias-eñ gand penn-bouh en eur zerhel da vond. »

Hag eñ da gregi en e vab dre e har ha d'e azeza war ar jao dibret evitañ, ha goude beza staget anezañ gand eul lerenn, e reas eul lamm war e aneval. Setu int o tremen dindan porrastell ar hastell. Ar hont a zalhe en e zorn rañjenn marh e vabig. Ar floh Konrad a zeue warlerh. Mond a reent a bilpazig hag ar paotrig a oa laouen-braz o tiskenn ar hreh gand e dad, ya, laouen-braz, heja a ree e zaouarnigou, sacha a ree war reun e loen ha klevet e veze e c'hoarz skeltr, ha lorch en tad o weled kement-se.

Hogen, eur wech erru en traon, ar hont a lakeas ar roñsed da drotal hag ar paourkaez bihan a gollas diouste e c'hoarz. Abof, e houlennas gand e dad mond goustadikoh, med pa welas e ree ar hontrol, poan dezañ o tialani gand an avel, en em lakeas da ouela, d'en em zifreta evel eur preñv ha da grial forz.

« Gouzoud a ran 'de ; ba ! kahaj ! eme e dad. Setu aze blejadeg kelou beza war varh evid ar wech kenta ! Alo, mabig, tao... »

O vond d'ober eun tamm cher d'e baourkaez bugel a oa evelato ar marheger pa spontas hag ez eas en gouez e inkane, poan dezañ o tond a-benn outañ. E keit-se en em ziflipas diouz e zorn kabestr aneval e vab ha pa hellas selled endro dezañ, e welas al loen o redeg etrezek ar gêr heb ar bugel. Daoust da gont a Uhelzouar da veza gouez ha rust, e santas eur gridienn en e galon o soñjal e kavje e vab ifomet war an hent. Hag eñ d'e glask, ken braz e anken ken e sache didruez war e varo. Bugel ebed. Hag eñ da soñjal e oa bet darhaot gand e varh pennfollet en touflez leun a zour ouz bord an hent, pa glevas, o burzud, mouez ar bugelig o hervel anezañ. Nepell diouz an hent, dindan eur wezenn, e oa azezet eur vaouez koz o luskellad ar paotrig war he barlenn. « Hola, gwrah koz, eme ar hont, taer ha rust, degas hennez din diouste.

— Amzer awalh ho-peus, aotrou, eme an hini goz, ken dicheg all, diwall 'zo d'ober da sponta ho loen ken kaer... Diouz peleh e teu ar haezig Doue-mañ ? Ahanta, pennfollet e varh, e oa manet e pign ouz eun troad, e vle a-rez mein an hent. Gellet em eus tapoud anezañ em davanjer.

— Gouzoud a ran 'de, eme ar paotr dihabask, damañ anezañ din bremañ, n'eo ket aez din diskenn diwar al loen feulz-mañ.

— Ya, va aotrou, med ho-pevit ar vadelez da ginnig din eur florin.

— Ba ! kahaj ! eme ar pez divergont, o teurel dezi tri diner.

— Eur florin eo an hini a fell din.

— Eur florin a lavarane-me ive ! Ne dalvezet ket te da unan eur florin, na ne rez, koz trutell goz. Alo, degas ar bugel din pe ez an da isa ar chas warnout.

— O hola, ne dalvezan ket me eur florin, emezi gand eur minhoarz goapauz, gwelet e vo petra a dalvezo eur florin war ho lerh, ya, en ho herez, kont a Uhelzouar ; med, pichoñs, kasit ho tinered ganeoh. »

N'he-doa ket peurechuet he homz, pa stlepas an tri bezig kouevr war-du ar marheger gand kement a ampartiz ma kouezjont o zri er yalh vihan ler manet gand hemañ en e zorn. Ha ken estonet ar paotr ken na jomas saouzanet eur pennadig, med ken prim all ez eas en gouez adarre. Eñ neuze da dapoud e vousked, d'e garga ha d'e stigma war ar wrah. Dond a ree homañ war he fouez en eur bokad hag ober kaezig hag allazig d'ar beskонт. « Ma faotr bihan ez out-te, ma zamm krennard, hañ koulouchig-me !... chom evelse ha ne vanko netra dit. »

Lakaad a reas neuze ar paotrig war e dreid hag en eur

heja he baz beuze : « Uhelzouar, Uhelzouar, ho-pezit soñj e tleit eur florin din. » Hag hi koachet dioustu e-touez gwez ar forest e-pad me oa ar hac'her diaez o vallozi. Konrad, ar floh, ha ne ree hoaz nemed krena, a dapas Diter, e azezas dirazañ war e varh hag int d'ar hastell.

Ar wech kenta e oa bet, med ive an hini diweza evid an den balh da gas e vab gantañ da vale war varh. Gwe-rouzet ha garmet e-noa p'o-doa redet ar hezeg, ahanta, hervez soñj an denjentil, ne vefe jamez eur gwaz. Displijadur en-deveze ar paotr sod o weled e grouadur, ha pa zeue d'e vete — ar hrennard a blije kalz e dad dezañ —, e ree sin dezañ da bellaad : « Gouzoud a ran 'deo ; ba ! kahaj ! »

An itron Hedwig, bepred ken dous, a veze red dezi gouzañv karreou he fried, med kement a ruster e-keñver an inosant bihan a jome war he halon. Meur a wech endeo e oa kouezet klañv, bourreviet an tamm anezi o weled ar hastizou kriz a goueze war he mab evid netraigou, pa veze kanfard hepken evel an oll vugale. Kement ha ken bihan ma varvas ar paourkaez plah, yaouank flamm hoaz, gouelet gand ar mitizien hag an oll dud diwardro, med dreist-oll gand he faotr bihan, na petra 'ta !

N'ez ee kas an tad evid e vab nemed war wasaad. Gourhemenn a reas Uhelzouar d'ar vagerez ha d'an aluzenner ober wardro ar hrennard ha ne soursias ken outañ, dreist-oll pa oe addimezet gand eun dimezell pinvidig a roas dezañ, ar bloaz warlerh, daou baotrig-gevell.

Diter a blije dezañ gweladenni ar vaouez koz he-doa e sovetaet. Homañ a gomze dezañ euz e vamm he-doa greet kement a vad dezi. Ar mitizien a lavare d'ar beskont tremen hep mond ken aliez d'he fete, rag brud he-doa Parkdi — evelse e veze anvet an hini goz — da veza na muioh na nebeutoh eged eur zorserez. Med ar paotrig yaouank n'e-noa ket aon outi, geo moarvad ! An aluzenner e-noa desket dezañ ne oa sorserez ebet e gwirionez ha ne oa an danevellou, a veze komzet enne euz gwrahed o vond d'ar sabad eun troad skubelenn etre o divesker, nemed fardaj ha gevier toud. Diter ne gompren ket evelato oll doareou Parkdi he doa kontet dezañ penaoz he doa greet da zinered e dad retorn d'o sah. Goud 'ouie ive e oa ijinuz ha dorniet-mad da oaza traed hag evajou barreg da yahaad an dud hag al loened. Kontet e veze he-devoa eur billig-hud ha pa lakae anezañ war an tan, e helle dichadenni ar gwasas barriou-amzer, med ze ne oa ket gwir, na ne oa. Deski a reas d'an aotrou yaouank berniou traou mad ha houzoud :

louzaoui hezeg klañv, prepari eun died eneb droug sant Gweltaz, boueta higennou evid pesketa. Pa varvas e vagerez, evel ma ne soursie ket e lezvamm outañ, n'e-noa ken nemed Parkdi.

Tamm ha tamm e kreske an daou vreur-gevell, pezh na zigasas tamm didu ebed da Ziter. Int ne oant ket kouezet diwar o jao deiz o marhekadenn genta hag o zad a oe stad ennañ gante, kavoud a reas dezañ e oant bugale diliket ha lemm o spered ; dall e oa gante ha bemdeiz ez eent o zri da haloupad war varh. Kelenn a reas deze oll ar pezh a ouie eñ e-unan, nebeud a-walh a dra vad, e gwirionez, peogwir n'e-noa desket ne lenn na skriva, nann, na bu na ba, ha soñjal a reas dezañ n'o-doa ezomm ebed e vugale da houzoud hirroh : « Ba ! kahaj ! emezañ » Med traou a zo a ouient 'vad, da zeg vloaz e teue leou-Doue gante, ha re hroz hoaz, pichoñs — ne daolent, eveljust, nemed d'o zad — Klask a ree an daou bez ifrontet kataill ha kann ouz pepini hag etreze o-daou e oent ken gouez ha ki ha kaz. Eun dra hepken a lakae an daou varmouz d'en em gleved : an troiou-kamm a itrikent eneb d'o hanter-vreur.

O mamm ne gemere ket kalz a nehamant gand o zechou fall, paotred e oant, emezi, hag ar grennarded evid ar yehed. Eun devez evelkent en em bilent kement ken ez eas eur mevel da gaoud ar hont. C'hwil a oar evel don ar pezh a respontas : « Gouzoud a ran 'deo ; ba ! kahaj ! » Memez tra e soñjas en e benn-maout e oa gweloh teurel pled gand aon en em lazfent, n'e-noa ket ankounac'het diougan Parkdi na oa evitañ nemed eur wir zorserez : « Gwelet e vo petra a dalvezo eur florin en ho herez ! »

Edo o chaseal eun deiz pa chomas da arvesti ouz diou grehenn stummet mad evid dougen peb a gastell. E venoz a oe greet dioustu gervel unan aneze. « Kerhinkin », abalamour m'e-noa lesanvet an hini bihanna euz e daou gañfard "an hinkin bihan", hag e gwirionez hegaser ha zoken kilienn e oa an tamm anezañ. Ar hastell all a dlee da genta beza "Kerflorin" kement ha goapaad ar zorserez, med, moarvat, ne gredas ket ar hont ha dibab a reas an ano "Meneheiez", ha pezh a zell, kalz dereatoh e oa. Ar plasou-ze o-deus miret pepini e ano ; ma tremenit dre aze, n'ho-po nemed goulenn.

Ar hont a oa e sell da lakaad e balez Uhelzouar e lodenn e vab hena, peogwir pepini euz an daou all en-defe e di, med e wreg a zalhas da zerru e benn dezañ ahann e-noe cheñchet e venoz : « Petra ma Doue ! Diter Goustadig — evelse e ree outañ dre ma ne oa ket ken

garz ha ken trammailler hag he mibien —, Diter Goustadig n'eo ket pinvidig a-walh hoaz, bet gantañ lodenn e vamm ? Setu eta e vefe red rei dezañ en-tuhont domani ken kaer Uhelzouar ha va bugale n'o-defe pephini nemed eur plas e-kreiz ar hoadou ! Gand ar vez ! »

Klask a reas ar hont rei da gompren d'ar berseval e oa Diter ar paotr-hena hag e oa deread lezel e herez gantañ. Hag hi da ouela, da zuhellad, da vouza ha da daeri, kement ha ken bihan ma plegas an aotrou dirag ardou e vaouez, eñ ha n'e-noa kammed souzet dirag den. Dre destamant, e roas eta Kerhinkin d'ar freterig bihan, Uhelzouar da Hodfrid, ar brasa euz ar gevelled, ha Meneheiez ha bourk Balañj da Ziter. Nebeud amzer goude e kouezas klañv ar hont. Pa lavaras ar medesin dezañ e oa deut e eur diweza, e respontas : « Gouzoud a ran 'deo » ha d'e aluzenner a alie dezañ digeri frank e galon d'e Zoue : « Ba ! kahaj ! » Derhel a reas da vallozi ha da zaoubenni ha mervel a reas evel e-noa bevet : garz evel eur penton ha peher touet.

A-veh echu an obidou, setu e lezvamm o vond da Ziter hag o tiskouez dezañ an testamant, e bedas, goapauz, da lenn, peogwir e oa desket an aotrou. Krak ha berr, e lavaras dezañ n'e-noa ken netra d'ober e kastell Uhelzouar. Nag a blijadur he-doa o soñjal en oll leve he-devoa skrapet diwar e goust, eñ, ar paotr-hena. Diter a blegas hep eur ger dirag bolontez e dad. Leun e oa e zaoulagad a zaelou o kuitaad e di-genidig a chomfe ennañ relegou e vamm. War ar memez taol e vefe dispartiet diouz ar re a gare : an aluzenner ha Parkdi.

Kastell Meneheiez ne oa ket divalo evid pezh a zell, med pell daonet diouz peb leh ha trist mar deo posubl. En amzeriou kenta, e oe darbet d'ar paourkaez paotr koueza klañv o soñjal e ti e gavell.

..

Eun abardevez, ar gontez hag he daou vab — tapet gante o zriweh vloaz — a oa azezet e liorz-diabarz ar hastell. Setu ma welont o sevel kra Uhelzouar eur haer a varheger gand eun toulladig mevelien hag eul leter, eur gwele-baleer euz ar brava, douget gand dao vul. Piou an diaoul a oa ar marheger ? Pephini a glaske... Freterig an hini a zeuas ar primma gantañ : « Taoc 'zo, hennez, pichoñs, eo ma breur, e veurded aotrou kastell Meneheiez ! »

— Diter Goustadig ! eme ar gontez souezet... Moarvad ez eo deut da bedi ahanom hag evid va dougen emañ al leter-ze gantañ, sur-a-walh. N'em-befe ket soñjet e vefe

bet va lez-vab eun den ken brokuz ha ken savet-mad. Red eo beza ken seven hag eñ, diskennom d'an nor-dal evid e zegemer. Bezit evel ez eo dleet en e geñver ha marteze e roio dim un tamm kouignaoua, pa vim erru e Meneheiez, piou 'oar, eur marh da unan, eun ekipaj d'egile, ha me am-eus c'hoant pell 'zo, da skrapa kolier-diamant e vamm.

— Me ne ran forz euz profou al luduenn-ze, eme Hodfrid, ha n'hellin ober nemed penn-koz outañ. Gwelloh e vefe ganin gweled anezañ o vond da heul on tad, e leve Meneheiez a vefe dim, hag ar holier, itron, a hellfem gwerza marhad-mad deoh.

— Sell ar genou tagnouz-mañ ! eme ar vamm dicheg. Red e vefe din paea eta ? Egiz-ze hoh-eus anaoudegez em heñver evid beza skrapet Uhelzouar evidoh ? Freterig, bez em-bo anezañ evid mann, lakeda ?

— Ya, pe goh, netra evid netra, eme hemañ en eur c'hoarzin goapauz. Ha ma talvez ar holier-ze kement hag eur hastell ! Ne vefem ket sod awalh evelkent evid e staga endro d'ho kouzoug. P'e-no greet Diter e dalarou, ez aim du-hont da ranna e vadou etrezom ha ra vin daonet ma ne werzan ket me ma lod en diamantou-ze. Ma vezit brokusoh eged an uzurer, itron, e vo deoh ar bravig. »

Ar gontez a voustras war heh imor, rag erru e oant e toull an nor. Diter a oa o treuzi ar pont lemm-laka ; pa welas e lez-vamm hag e vreudeur, e tiskennas diwar gein e varh hag e saludas aneze, hegarad.

« Pegen gentil ez oh c'hwil, aotrou va mab, da veza deut d'or gweled, a lavaras mestrez Uhelzouar gand eur vouez flour hag he brava minhoarz, petra a nevez e Meneheiez ? En em blijoud a rit ? O ! gweled a ran ez eus ganeoh eur gwele-douger, hola 'vad, pegen koant ! Ne vefe ket re zister evid eun impalaerez. 'M-eus aon emaoñ o soñjal dimezi.

— N'on ket da ! Tamm kelou ebed hoaz euz se, itron. Da hortoz, e rankan kaoud unan bennag da zerhel kompagnonez din, setu perag emaoñ-me emañ gand va leter.

— O, ma Doue, pegen mad ha pegen doujuz, eme dezañ e lez-vamm likoerenn o c'hoari he sardig.

— Ya, n'eo ket aez tamm ebed ken d'an tad Jozef, an aluzenner, mond war varh, a gendalhas Diter war e bouez. Kas a ran ganin va helenner koz, divizet or-bo kement-se etrezom on-daou 'raog ma kuitais Uhelzouar. Dond a ray ganin ivez Parkdi gaez a zo aze en draoñenn o tui gand ar vizer. Erru eo koz, lakeda, hag hi a zavetaas ma buhez din gwechall, an deiz kenta din da veza gwintet war eur jao. Pehed marvel e vefe din lezel anezi da

vervel en dienez, rag n'eo ket kambrou goulo a vank du-hont e Meneheiez. Paourkaez koz, brao e vo dezi ganin... »

Hag eñ a-dreuz ar porz...

Danta a reas Godfrid e vuzellou gand ar gounnar ; ar gontez a oa manet ganti he genou war c'hweh eur hag he lipenn war he lapenn. Freterig, ordinal ken goapaer ha ken heg, a houlennas, flañchet e henou beteg e ziouskouarn o c'hoarzin : « Peseurt talvoudegez e-neus ar marh a ro din ? Godfrid, kontant ez out da rei din da harnez evitañ ? Ha-ha-ha, an aluzenner hag ar wrah da Veneheiez ! Diouz ar henta e vo an daou foerer koz-se asamblez. Gelloud a ray Yann-Goustadig kemer kente-liou gresianeg diouz ar mintin ha deski itrikou ar zorse-rez goude kreiztez. A ! me lar deoh e ra ar babouzeg-se troiou fentuz ! Yann eo a viskoaz ha Yann e chomo...

— Ya, eur Yann-Gouer n'eo ken, eme e vamm, glaz gand an erez... Propoh e vefe dit, mihieg, chom heb c'hoarzin, gand ar vez ! Ya, eur vez eo evid on tiegez... Goap a vo greet ahanom... Petra a lavaran, al lu eo an hini a vo greet ganeom pa vo gouvezet ez eo deut kont Uhelzouar da gerhad ar hoz gwrah en eur gaer a leter douget gand muled, hag ez eo eet gantañ da chom en e gastell Meneheiez. Teurel a ra d'e vamm, red e oa dezi ordinal beza o sevel he fri e ti ar re glañv ha ar beorien, hag ar re baourra, war ar marhad. N'ouzon ket penaoz ne zav ket va gwaz er-maez euz e vez...

— O neuze, eme Freterig, e lavarfe hoaz, kredapl : « Gouzoud a ran 'deo ; ba ! kahah... »

— Ma ! Doue 'breverzo ! Erru eo aotrou Meneheiez gand ar gwerouz koz ha krog eo en e gazel, pichoñs, eme ar vitrañsenn. Deuit, tra-walh em eus gwelet e galite. » Hag int kuit.

Diter a gasas e vestr koz beteg al leter e-tal ar pont ha sikour a reas anezañ da azeza e-barz. En draoñienn, an oll a lohas dirag tiig-soul brein-tuf Parkdi-goz a oa o hortoz gand eur bakadenn leun a vuredou.

Ar pezh a ziougane kebenn Uhelzouar n'erruas ket, pell ouz ober goap euz madelez Diter, deut mad gand an oll eo an hini e oe, peogwir n'ankounac'he ket e vadoberou-rien ; ne oe nemed ar gastellidi eneb dezañ, pezh na reas poan nemed deze o-unan. Doareou ar hevelled garz a oe anavezet gand ar vro a-bez ha tamm ha tamm e oe klevet lavared e veze trouz dalhmad etreze hag o mamm, hag etreze o-daou, an eil billig o chakad rebechou d'ar billig all.

Ar hont Diter a Veneheiez a reas e seiz posubl evid en em glevet gand e vreudeur ; ne ree ket plijadur dezañ

gweled aneze o tremen tostig ouz e gastell heb dond d'e zaludi hag eur gwir glahar e veze evitañ keja gante er parkeier hag er hoadou hag int ken hegarad ha bodou linad. Ne zervije ket, muioh e klaske tostaad oute, muioh a hoap a reent outañ. Evel ma ouie e oant gwariziu ha tost, e kavas evelkent eur menoz mad. War e zomani, med keit-ha-keit ouz an tri gastell, en em lede eul lenn edo ennañ ar brudeta begeded ha karped diwardro. Evel ma oa sod-nay an daou vreur-gevell gand ar pesketaerz, o-doa kas ouz o zad abalamour n'e-noa ket laosket ar stank-se gante. Re vrazoniuz edont evid dond da besketa annañ dre laerez hag evid goulenn aotre digand ar perhenn. Med hemañ a anaveze a-walh e vreudeur evid kompren o c'hoant ha pedi a reas aneze da zond eun deiz d'e weled war ribl al lenn.

Derou an hañv. Kaer-dreist an amzer. Kazi asamblez eh errujont.

« Pegen iskiz, eme Freterig, me am-eus kuitaet Kerhinkin da seiz eur.

— Me ivez.

— Ha me ivez, a respontas an daou vreur Meneheiez hag Uhelzouar.

— Ma feiz neuze, eme Gerhinkin, emañ al lagenn gaer-mañ keit-ha-keit ouz an tri hastell.

— Ar wirionez a zo ganit, ha setu perag em-eus ho pedet da zond, eme Ziter. Gouzoud a ran e plij kalz deoh pesketa, ha daoust din da veza pesketaer ivez, e kav din ez eus peadra emañ da gontanti pephini ahanom, na posubl e teufem asamblez. Mar kirit eta e vo bremañ al lenn etrezom on-tri hag an eil hag egile ahanom a vo mestr warnañ.

— O hola 'vad, on breur a zo gwall vrokuz, eme Freterig, goapaer. Emañ e sell da ginnig dim c'hweh devez-arad... dour hag eun toulladig kantadou pesked ! Hum !... ha petra or-bo-ni da rei dezañ ? Ne vez netra evid mann, ze 'zo sklaer !

— Evid mann e roan-me, a respont Diter dezañ, ar pezh a houlennan hepken eo gweled ahanoh emañ ha gelloud haozeal ganeoh. Daoust hag eñ n'om ket euz ar memez tad ?

— Ar pezh a ginnigez dim aze a zo eun dra diod ; n'ez eus ket sotoh eged klask pesketa asamblez, an eil a vez war hent egile. Perag ne zeufem ket pephini d'e dro : Diter, al lun hag ar yaou, Godfrid ar meurzh hag ar gwe-ner, ha me, ar merher hag ar zadorn.

— Ken fall all, eme Uhelzouar, me n'houlan degemer netra digand den na rei an disterra tra da zen. Kement a dreud ha te on-eus war al lenn, Diter, neuze 'ta n'on-

eus ket nemed tenna plouzenn-verr. Ma honezan, e hellot evelato goulenn diganin aotre da zond da besketa.

— Morse ne stokan ouz an diñsou, eme Veneheiez, dipitet o weled pegen aheurtet e oa e vreudeur.

— Eveljust, eme ar hejer-e-doull, or breur a zo den ken devod ! Evitañ ez eo pehed marvel c'hoari tu-pe-du, med eur menoz am-eus ne vefe ket nahet zoken gand eur manah : n'on-eus ket nemed mond da gerhad or gwallengouez-pesketa, an hini a dapo hirie, 'raog kreizteiz, ar muia a besked a vo perhenn d'al lenn.

— E gwirionez, eme Ziter, ne vin nemed eun hanter-henaoueg o klask gonid ar pez a zo din endeo, med evid diskouez deoh pegen eeun e oa va hinnig, eh asantan, ez an da gerhad ma zraou. »

Pephini eta d'e gastell. An daou vreur-gevell da lakaad o oll vevelien da drei mein evid klask buzug. Diter ne reas nemed kemer e vinviou hag ar boued pesked aozet dezañ gand Parkdi, hag e oe distro heb dale. Pan erruas e vreudeur, e laoskas aneze da zibab ar plasou a felle deze, ha neuze dao dezi. Med, evel p'o-defe anavezet o ferhenn, an oll besked, begeded ha karped, a zeuas da c'hoari chiboud endro da higenn Diter. Ar re vrasa a voute war ar re vihan hag ar hont a zeue gantañ pez a gare a besked a vent kaer. A-veh e linenn en dour e veze etre ugent ha tregont genou digor dirazi. Ped a dennas diouz an dour ? N'ouzon ket, med eur bern mad e oe, eveljust, en e gichen div eur goude. Eñ neuze da lakaad e vinviou a goztez ha da vond da weled, penaoz e oa kont gand e vreudeur. Freterig n'e-noa tapet nemed eur garpenn vihan ha diou baourkeiz biologig ha Godfrid tri draeneg ha daou wennig. Penn-koz a ree an eil hag egile, rag gweled a reent an niver marzuz a loened sachet er-maez gand o breur-hena. Pa dostaas Diter ouz Godfrid, hemañ da sevel, feulz, da ziframma e linenn diwar he hevonn, d'he zerri a dammou bihan ha d'o zarhoi en dour. « Me 'garfe e vefe mil higenn war bep tamm hag eur pesk kaer war bephini, med peogwir ez a an traou a-dreuz, dre strobinnellerez, rag penaoz e hellfez-te ahendall, Diter Goustadig, paka muioh a besked en eur penad egedon en eur bloavez, Yann Beul ma 'zout ?

— Gwirionez rik, eme Kerhinkin, soñj am-eus bremañ e oe desket dezañ pesketa gand Parkdi, ar zorserez daonet. Bet om sod a-walh evid esa dond a-benn euz eun danvez achantour.

— Teodou milliget ! Abaoe ar beure-mañ em-eus gallet gweled pegen piz ez oh, pegen divergont, pegen fall. Kit gand ar foeltr ha na lakait ken ho treid amañ. Evid mad hoh ene, e karfen e vefe en ho kalonou eun hanter

hepken euz karantez-Doue ha grad-vad a zo e hini ar paourkaez koz a zrougkomzit diwar he fenn.

— Hañ nann 'vad n'eo ket eur zorserez, eme Freterig, o hoapaad, peotramant e vefe gweloh divinerez. Diouganet he-doa d'on tad e vefe skrapet digantañ eul lodenn vad euz e leve hag e vadou evid eur florin... Ya, pe goh ! Maro ez eo, mestr nemetañ war ar vro a-bez. Parkdi n'eo nemed eur hoz penn-sod ha te a jomo bepred Diter Goustadig... Ya, Yann ez out bet ha Yann e vi... »

Hag an hejer-e-doull da skarza rag kreñv a-walh e vefe bet e vreur-hena evid bruzuni anezañ. Godfrid d'e heul goude beza dijavedet eun hanter-dousennad leou-Doue. Hennez 'vad a oa mab d'e dad !

Dizrei a reas Meneheiez d'e gastell, heuet ha samm-met e galon ken e oa samm-met, rag goud'ouie e oa echu bremañ etre e vreudeur hag eñ. Ken glaharet e oe ken e kouezas klañv, med ar beleg koz a ouie sioulaad e galon gand e gomzou ha Parkdi a reas dezañ kemer louzou.

Pa glevas ar vreudeur-gevell e oa klañv Diter, e oe lazet gante o larta porhell, ha lonkaj war an daol 'vad ! Setu ar pez a oe divizet etreze : « An hini kenta a glevo kelou euz e varo a lakaio e oll ganoliou da strakal ha gwella barikenn win ar genaoueg a vo evitañ. »

Unan euz marhegeien Uhelzouar a oe lakaet da hedall wardro Meneheiez ha Freterig a roas eur yalhad vad a arhant da unan euz mevelien e vreur-hena evid diredeg d'e vete adaleg ma vefe e vestr war e dalarou. Med ar servijer a oa sotoh gand e aotrou ken madelezuz eged gand kont divergont Kerhinkin. Eun abardez, daoubennet a-walh, e houlenas gand Parkdi penaoz e oa kont gand ar hlañvour. Goude m'e-noe klevet ez ee kalz gweloh, e tiskulias d'an hini-goz pegen hast o-doa an daou heritour da zigemenn maro o breur an eil d'egile a daoliou kanon. Homañ, dampred e vije toud, a fuloras hag a yeas da gonta da Ziter. Ken diskredig e vanas ma'h alias ar vaouez dezañ rei da gredi d'e vreudeur e oa maro. Gwelet a-walh e vefe petra a rafent. Ar hont a halvas paotr e yalhad, a glevas digantañ doareou e vreur hag a gasas anezañ dioustu da Gerhinkin da gemenn e oa war e dremenvan.

Krog e oa da ziskenn kra ar hastell a-diz hag a-dag pa gavas spioner Uhelzouar a reas sin dezañ da areti e varh hag hemañ da houlen digantañ peleh ma Doue ez ee evelseig :

« Siouaz, ma faourkaez mestr a zo erru pell-pell ganti, ne welo ket an heol o vond da guz, n'eus tamm spi ebed ken. »

Ha marheg Godfrid war lein ha da skarza ken buan

ha ma vefe bet an Diaoul war e lerh... Eul luhedenn ! E varh a gouezas maro-mik dirag dor-dal Uhelzouar hag eñ, a-raog mond er bord-all, e-noe just amzer a-walh da grial : « Emañ kont Meneheiez war e dalarou. »

Oll ganoliou ar hastel da strakal ha da vrammad ken na grene peb tra, ha stad en aotrou hag en e vamm o soñjal er gwin, er stank, en diamantou hag er madou all. Tregerni a ree ar vro a-bez... Med ar pezh o-doa keme- ret da genta evid an hekleo ne oa nemed strakadeg kano- liou Kerhinkin ha Godfrid da lavared d'e vamm : « Ar fri-mihi bihan, ar skribitenn di-die, e-noa lakaet ivez eur spioner, red e vo dim eta lodenni beteg ar varikennad win. » Hag eñ da zibra e varh, aon gantañ eh errufe Fre- terig du-hont a-raokañ da skrapa eun dra bennag.

Ar memez soñj a oa deut d'an daou babor, rag en em gavoud a rajont asamblez, pinouz awalh, e-kichenn al lenn. Hini aneze ne rannas eur ger truez evid o breur- hena. Taoe 'zo, red e oa deze, lakeda, gouzoud penaoz lodenni etreze douarou Meneheiez, ha, da genta toud, da biou e vefe ar hastell ? Med n'o-doa ket peurlakaet o zreid war ar pont-wint pa weljont Diter o selled oute, fuloret, diouz prenestr e gambr. N'eo ket c'hwi lar ! spontet-mik ar hevelled, hag int d'ober sin ar groaz, rag soñjal a reas deze da genta e oa tasmant an hini maro, med pa gomprenjont :

« Ba ! kahaj ! soñjal a ree dim e oas eet da anaon, eme Godfrid.

— Red e vo gortoz eta, eme Freterig, sellou a-dreuz en e benn.

— Selaouit, a respontas mestr an ti, c'hwi ne doh mann ebed din ken, foeltr Doue seurt, rag n'ez oh, gand resped, nemed moh, klevet em eus todillon ho kanoliou. Gand ar vez ! Bezit war evez, me am-eus amañ ivez pemp bombezerez ha karget ha toud int bet a-ratoz kaer evi- doh, hastit buan sacha ho kalite ahann peotramant e tiskouezin deoh ez eus ivez kanolerien e Meneheiez. »

Diter a skrivas e destamant an deiz warberh ha Park- di a lavaras d'an aluzenner : « Me 'zo sur n'eo ket eet da zina e beadra gand e vreudeur, ar ganolerien. »

Kontant e vefe bet an hini-goz da houzoud, med en aner e kuriuzas ar hont ha ne ouias jamez. Eur bloaz goude e varvas daoust d'heh oll louzou. Evid lared, n'he devoa kleñved ebed nemed ar gozni, triweh vloaz ha pevar-ugent dezi. Na pa vefe bet ar baourez-se e vamm, n'en-defe ket greet ar hont kaerroh obidou dezi. Keuz, keuz braz e-noe dezi hag eur wech nijet d'ar baradoz, nebeud goude, ene ar beleg koz, en em gavas e unan- penn evel pa vefe bet emzivad eur wech ouspenn.

E gwirionez, ne badas ket pell Diter war o lerh, mer- vel a reas en e seizved bloaz-war-nugent hag an teodou lemm a lavare e oa bet ampoezonet dre urz Freterig, ar skribitenn vis-fall. Ar pezh a zo sur, dambrest goude e varo a oe klevet tennou kanol o strakal, pemp war-nugent e Kerhinkin ha kement-all e Uhelzouar.

« Ar wech-mañ e-neus sachet e skasou gantañ, eme ar marmouz bihan d'e vreur, p'en em gavjont war hent Meneheiez.

— Ya, eme egile, ha ma fell d'ar poezon-ze resusita, diskouez e fri e prenestr e gambr evid dismegañsi aha- nom, e roin dezañ eun tamm kentel gand ar mousked- mañ. »

En em gavoud a rejont prestig goude gand eur mar- heger hag eun toulladig tud d'e heul. Ar hevelled da soñjal e oa eur mignon d'o breur deut evid an intera- mant, hag int neuze 'vad gand ardou a beb seurt, da zis- kouez keuz hag eur bern chare, ya, d'ober o haz-gleb. Eun druez e oa, emeze, mervel ken yaouank-se. An hejer- e-doull a zeuas a-benn zoken da hlebia korn e lagad gand eun daerenn bennag. Med ar marheger ne ree ket van hag a jome ken mud hag eul lakez pikez, derhel a ree da vond war e blen en o hichen. Tremen a rajont war ar pont-prenn hag a-veh er porz :

« Setu aze, aotronez, holl oll herez, ho lod e madou ho amañ ha ra zigaso gwin dim hag euz an hini gwella, daonet 'vin. »

Hag an daou gont, tiz warne, d'ar viñs droidelluz a gase d'ar sal-vraz hag ar marheger war o lerh heb eur ger. Pa oe azezet an daou heritour pephini en eur penn euz an daol-varb, o henveajer diano a dennas diouz e hodell eur pezh arhant a zeuas da goueza diraze gand eur stirlink sklintin, a vervas eur pennadig evel eun ton- ton-besk...

« Setu aze, aotrone, hoh oll herez, ho lod e madou ho preur. Sellit ervad hag eñ emañ ar gont : EUR FLORIN. »

Ha paf an daou lankon ! Med goude beza sellet an eil ouz egile en em lakajont da c'hoarzin hag unan aneze da houlen digand ar marheger petra a felle dezañ lavared. Hemañ a zisplegas eun tamm brao a feulienn-barch eur bern kachedou koar liesliou warni. Diter e-noa dibunet aze an oll drubuillou greet dezañ gand e vreudeur ha goude setu ar pezh a hourhemne sklaer ha fraez : adaleg ma vije maro e vefe e oll vadou ha leve da zugelez Würtemberg evid priz eur florin, med kolier diamant e vamm a dlefe beza implijet gand an dug da sevel eun ospital evid ar re-goz en e gêr Balañj.

Ha ken paf all ar re a lavaran deoh, med n'o-doa ken c'hoant da c'hoarzin, skrignadeg-dent a oa kentoh gante. Med petra a rajent eneb da aotronez-veur Würtemberg?

Ha setu penaoz e oe kollet gante domani kaer Meneheiez, koadeier, parkeier, kêr Balañj ha zoken al lenn. Ne vane gante nemed eur florin! Godfrid henn lakeas en e hadell en eur rahoani hag an daou heritour yennet kuit heb saludi kefrediad dugelez Würtemberg.

Piou a oe kerse ganti ivez nemed kontez Uhelzouar nahet outi ar holier-diamant. Hag hi da zerri e benn d'he mab : m'o-doa kollet he mibien herez Meneheiez, eme an dieurenn, ez eo abalamour ne oant bet nemed paourkeiz tud diaviz, leueiou, evid lavared krenn ar wirionez.

Godfrid, mouzet, da lammad war e varh evid mond beteg Kerlinkin, hag eñ da houlenñ digand e vreur : « Peleh ez aim da zispign pezh aour Diter Goustadig — ra 'z aio e stripou gand an Diaoul — d'an ti-c'hoari pe d'an ostaleri ? »

— Gwelloh eo mond d'an davarn, eme Freterig, aze ez om sur da honid eun dra bennag. Daoust dim da veza kollet kêr Balañj, evel genaoueien, eom beteg duhont da ziskouez n'om ket re zipitet.

— Ya, hag en « Ostaleri an Oan » ez eus gwin ruz ha ne rafe ket fae an Impalaer warnañ. »

Hag int da Valañj da ostaleri an Oan hag ar gwin war draoñ. P'o-doe evet evid talvoudegez eur florin, Godfrid a zavas hag a daolas war an daol ar pezh a veze spurmantet warni eun heiez o tehel kuit : « Hep, tavnour, dal ar florin-mañ, evelse eo ar gont, lakeda... »

Mestr an ti a gemeras ar pezh, e droas ha didroas war balv e zorn hag a lavaras gand eur minhoarz : « Ya 'vad, ar gont a vefe ma vije bet mad ho pezh, med eun heiez a zo warnañ ha deh da noz e teuas eur hannad diouz ar hastell da gemenn n'o-doa ar re-ze talvoudegez ebed ken. Damañ din, mar plij, unan all. »

An daou vreur, morlivet, a zelle an eil ouz egile ken paf hag an deiz 'raog : « 'Teus ket nemed paea, te, eme unan.

— N'eus ket moneiz ganit, eme egile ? »

N'helljont ket paea tavnour Balañj, red e oe deze dizrei d'ar gêr ken mezuz ha lern bet yennet gand eur yar, ha mud e choment. Pa oent erru en diweza kroazhant, araog en em zispartia, Freterig a lalvaras :

« Malloz ma Doue netra, kant gwech nebeutoh eged netra, setu ar pezh a zo deut dim a-berz or breur millijet,

daonet ra vezo. Hag evid anzav eeun ar wirionez, ar gwin zoken ne dalveze ket kalz tra.

— A zo gwir, med daoust hag eñ n'he-doa ket ar wrañ Parkdi diouganet peb tra ?

— Gouzoud a ran 'deo, eme Freterig.

— Ba! Kahaj! a respontas kont Uhelzouar. »

Dizrei a rajont d'or hestell, teñval o fennou, ken laouen ha kezeg digerh, mouzet eneb d'an oll ha mezuz oute o-unan.

Setu penaoz eh echu kontadenn ar florin a zo gwir, hervez. Eun tavnour euz eur gêr tostig d'an tri hastell a zibunas anezi din.

MOUGED STEENFOLL

E-barz unan euz inizi rohelleg Bro-Skos, e veve er memez ti, bremañ 'z eus eur flipad amzer, daou besquetaer evuruz an eil gand egile. Dizimez e oant o daou heb na kar na par, hag evel ma labourent o daou, ne veze ket re dreud o heusteuenn. Dam memez n'oad edont, med o neuz hag o doareou a oa ken disheñvel hag eun erer euz eur reunig pe, mar deo gwelloc'h ganeoh, eur sparfell euz eun houad.

Gasparz Strumpf a oa berr ha lard evel eur sah-toaz, e zremm gand e zioujod koeñvet a oa ken ront hag eur bezel. E zaoulagad sklaer ha c'hoaruz ne seblantent anavezoud begad fallagriez ebed, na kennebeud beza kustum ouz glahar pe nehamant. Ma oa lard, e oa ive laosk, yost ha didalvez, ha setu perag e veze lezet d'ober endro d'an ti : poaza boued, aoza rouedou da besketa ha da werza, pledi gand eun tammig park.

Hag e genseurt ? Treud evel eur gloh ha hir-hir an tamm anezañ. En-tu-hont, eur pezh fri erer, o vond pell dirazañ, ha daoulagad ken lemm ha re eur sparfell. Ne oa en enezenn na gwelloc'h na kalonekoh pesquetaer egetañ ha n'e-noa ket e bar evid krapoud a hed an tornaod evid laerez viou an evned. Dorniet mad e oa ive ha ne veze ket gwelet marhadour tostoh d'e wenneien war foarleh Kirchwall, med evel ma veze mad e varhadourez ha leal e genwerz, e plije d'an dud kaoud afer gantañ. Ha Wilm Falke — setu pe ano a veze greet outañ — daoust dezañ da veza tost e veze kontant ordinal da lodenni gand Gasparz. Ne dae ket fall o aferou ha frank zoken e oa erru an traou gante. Med, siouaz, Falke e-noa eur garantez direiz evid madou an douar, felloud a ree dezañ beza pinvidig, pinvidig-mor, med dond a reas da gompren ez eo diaez d'an nen trehi ar mennad-se netra nemed gand al labour pemdezieg, ha tamm ha tamm e savas eur sorhenn beguz warnañ : kavoud an tu da rastellad eun teñzor bennag. Ar c'hoant-se a zeuas da veza mestr warnañ korv hag ene, n'helle soñjal e tra all ebed ken ha

konta a reas e venoz da Hasparz Strumpf. Ha petra a lavaras kemañ ? Ma feiz, netra ; ze a dlée beza posubl, peogwir e lavare e vignon. Med ar pez ez eo, mond a reas da blabousad e ti an amezeien hag ar vrud a redas buan e-noa greet Falke marhad gand an Diaoul. C'hoarzin a reas da genta o klevet al loegaj-ze, med tamm ha tamm e teuas da soñjal e hellfe eun arhouere bennag diskouez dezañ eun teñzor kuzet. Pa ree goap darn euz e amezeien outañ, ne zislavare ket aneze. Med ne oa ket ken rust ken war al labour, chom a ree ar rouedou da zeha ha zoken da graza e-pad ma veze ar pesketaer gand e grakvenoziou.

Eun devez, gwaz-a-ze dezañ, e oa o lonka avel war an traez, o klask penn pe lost d'e zorhennou, e zaoulagad paret war an houlennoù spoumuz, evel pa vefe bet engortoz euz eun dra bennag digante. Unan euz ar gwagennoù, daoust d'ar bezin strewet dre oll, a zegasas beteg e dreid noaz eur voull velen, eur voullig aour, mar plij.

Wilm a jomas e henou gantañ war c'hweh eur, 'vel just. War an taol, setu seblant ar wirionez o tond d'e zorhennou, setu degaset dezañ gand ar mor aour, gwir aour melen ha lugernuz, moarvad ar peurrest euz eur mell tamm bet ruillet ha diruillet en islonkou beteg dond da veza eur ganetenn.

Ne oa ket da dortal, sklaer e oa peb tra evitañ bremañ : eur vatimant vraz bennag, leun a binvidigeziou, a oa en em gollet en eun tu bennag diwar-dro ha tonket mor. Ne zoñjas ken e netra all. Grik na lavaras da zen, zoken d'e wella mignoned, pez a zo komprenabl, lakeda... Med ar pep gwasa, ne zeue tamm labour ebed gantañ ken, noz-deiz e veze gwelet a-hed an aot, nonpas gand e rouedou, med gand eur bal vihan o feketa en traez hag en-dro d'ar herreg. Petra a gavas ? Mann, paz zoken eur siseurt, mizer hepken, peogwir ne honeze ken netra.

N' eo ket strivadennou divalo ha di-dalvez Gasparz a zeufe da benn d'o beva, ma Doue nann, ne oa ket ennañ danvez eun tad 'r bara. Tamm ha tamm e oe dispignet oll beadra an daou baotr yaouank-koz, zoken an tammig aour kavet. Petra a lavare Strumpf gaez ? N'ho-pije ket klevet anezañ o lavared ouf. Evel m'e-noa kavet mad araog gweled Falke o labourad evitañ, ne zeue ket d'e spered rebech dezañ chom dilabour. Ha gwaz-a-ze evid Wilm e-nefe bet ezomm a-walh unan bennag d'ober eun tamm heja dezañ. Setu ma talhe hemañ eta gand e enklaskou. Eun dra n' em-eus ket lavaret deoh hoaz : en e gousk e klevet dalhmad eur gomz kevrinuz, med ar gomz-se, atao ar memez hini ha distaget fraez, a yae dioustu diwar e zofj. Peseurt liamm etre ar ger-ze hag e derzienn-

an-aour ? Ne ouie ket just a-walh, med an darvoud iskiz-se n'helle nemed e drei gwasoh hoaz war du e c'hoantadenn ha rei dezañ da gredi e oa tuet da veza eüruz eur wech bennag, ha penaoz beza evuruz heb eur zamm aour ?

Eun deiz, setu eñ tapet gand eur barr-amzer fall spon-tuz a-rez d' ar mor, just e-leh m'e-noa kavet e dammig aour, ha ken garo ar gorventenn ken ez eas da glask repu en eur groh tostig alese. Ar heo-ze, anvet Mougeo Steen-foll gand an enezidi, a oa eur riboul don digor war ar mor dre daou henou ledan en em steleje enne an houlen-nou eonennet gand eun trouz, eur safar spontuz. Penaoz e helled mond e-barz ? Ahanta, dre eun toull bihan kleuzet e kroeh ar vougeo, med ne oa bet gwelet morse o pignad aze, evid lâred, nemed Yann-Grenn abil ha kerdrubuill. Aez eo kompren e oa hennez eun toull dañjeruz, ha n' eo ket eun tamm bihan, hag ouspenn, tasmantou, hervez... Med tavom. Wilm a zeuas a-benn d'en em vouta aze ha da ruza beteg beg eur pikol rohell, daouzeg troatad a-uz d'an dour ribotet ha gwenn toud gand an eon, e-pad m'en em zile endro dezañ eun avel pennfollet. Wilm, ze 'zo sklaer, ne oa nemed eun dra war e spered, ne ree nemed soñjal el lestr eet da goll. Daoust peseurt batimant e oa honnez ? Ne ouie ket eur siseurt diwar he houst, ar re gosa zoken n'o-doa biskoaz klevet komz euz eul lestr distrujet wardro. Pegeid e chomas beuzet en e zoñjou ? Ne vefe ket bet gouest d'henn lavared ? Pa deurvezas evelkent selled pishoh en-dro dezañ, e spurmantas e oa tavet ar barr-arne. O soñjal mond kuit e oa pa zavas eur vouez diouz an islonk ha setu ar pez a glevas mad ha fraez : « KAR-MIL-HAN ! ». Spontet, dislontet e zaoula-gad, e klaske gweled dindannañ : « Ma Doue benniget, emezañ, hennez eo ar ger a glevan em housk ! Med ne gomprenan seurt !

— Karmilhañ ! eme eur vouez adarre. »

Wilm, daoust dezañ da grena gand an aon, a zeuas a-benn da zacha e foñs gantañ, da adtreman en toullig ha da skampa beteg e lochenn.

Koulskoude Falke ne oa ket abaf, na ne oa, med tapet berr e oa bet kentoh ; ha neuze, ken braz c'hoant e-noa da zond da veza pinvidiz ken ne oa ken barreg da brede-ria, n'houlle ken memez lakaad en e glopenn e hellfe beza arvaruz an hent a zalhe da vond gantañ.

Eur nozvez, diwezad a-walh anezi zoken, evel ma oa dindan skleur al loar o pesketa pe o c'houileta, dirag mougeo Steenfoll, e grog a jomas stag, ya, sahet lib, ha kaer e-noa sacha, mann ebed d'ober. Ha war ar marhad, setu an oabl o teñvalaad, ar mor o koeñvi dindan an avel

hag o vranškellad e vag ken e oe darbet dezi mond krenn war he hostez. Ba ! Wilm, a lavaran deoh, ne oa ket doanig : eur zachadenn rust ha nerzuz... Koueza a reas war e reor e foñs ar vag. Petra a oa c'hoarvezet ? Daoust ha torret e oa ar gordenn ? A greiz-oll, dres pa oa ar houmoul o vond da goach al loar, eun dra bennag teñval a zeuas war benn ha kleved a reas war ar memez taol ar ger fromuz « Karmilhan ». E oa o vond da dapoud krog en dra kevrinuz-se, med n'e-noe ket amzer da astenn e vreh ma oa teuzet dija en deñvalijenn. War wasaad ez ee an tourmant, red dezañ klask repu war ar herreg tosta. Aze e vanas sorennet ha zoken kousket da vad gand huñvreou e wele enne liou an aour, e kleve enne trouz sklintin ar peziou aour.

Pa zihunas Falke, e oa torret d'ar mor a luhe dindan liviou kenta an heol o sevel. E oa adarre o vond da das-tornad evel an deiz 'raog, pa spurmantas er pellder eun dra bennag a yae war greski. Dre ma tostae dezañ, e komprenas e oa eun tammig bag gand unan bennag enni ; med iskisa tra, mond a ree heh-unan war-raog heb gouel na taol roeñv ebed, troet mad he beg war-du an douar, daoust ma ne zeblante ket an hini a oa e-barz soursial ouz ar stur, ma oa unan. Tostaad a reas mui-ouz-mui ar vagig beteg dond stok-ha-stok ouz hini Falke a helle gweled bremañ eun tamm paotr-kozig koz-koz ha goeñvet e zremm ken e oa goeñvet, eur pezh fri kamm dezañ, gwis-ket gand berlinj melen, ha war e benn eur boned-noz ruz a jome sonn- sonn hag eeun. Klozet e zaoulagad ha difiñv evel ma oa, e tenne a-walh d'eur horv maro disehet. Falke d'e hervel ha, 'zo kaeroh, d'ober eun tamm heja dezañ, med van ebed. Krog e oa da amari an eil bag ouz eben pa zigoras erfin ar paotr-kozig e valvenno oh en em zifreta : « Daoust peleh emañ-me ? a hiboudas en hol-landeg. »

Falke a oa degouezet dezañ en em gavoud gand pesketaerien euz ar vro-ze o-doa desket dezañ eun toullad geriennou en o yez ; lavared a reas eta d'egile ano an enezenn ha goulenne a reas digantañ piou e oa ha petra e-noa degaset anezañ.

« Taoc'zo, eun taol sell e teuan da rei war ar « Harmilhan ».

— War ar « Harmilhan » ? En an'Doue, lavar din ar pezh a zinifi ar ger-ze, eme ar pesketaer leun a spi hag a esmae.

— Me ne respontan ket da houlenno troet war an ton-ze, eme ar paotr-koz, chifet hag evel m'en-defe bet aon... Bremañ, emezañ evelkent, ar « Harmilhan » n'eo netra, med gwechall eo bet eul lestr euz ar haerra, karget

gand muih a aour eged n' eus bet jamez e-barz hini all ebed.

— Peleh ha pegoulz ez eo bet goueledet ?

— Bremañ 'z eus kant vloaz, n'ouzon ket just a-walh peleh, deut on justamant da bleal gand se ha da zibab an aour goullonderet. Ma fell dit sikour ahanon, e vo eul lodenn evidout.

— Fidam, me a zo kontant a-walh, med petra am-bo d'ober ?

— Kaoud kouraj da genta. Da hanter-noz just e vo red dit en em gavoud er rann ar muia distro euz an enezenn-mañ. Kas a ri eur vuoh ganit ha, goude beza he lazet, e lavari da unan bennag paka ahanout en he brokenn. Ar memez hini a ledo ahanout war an douar hag a yelo kuit. A-raog e vo sonet eun eur e ouezi peleh emañ kuzet teñ-zoriou ar « Harmilhan ».

— O hola 'vad ! Evelseig e reas mab Engrol goz evid koll e ene ouspenn d'e damm buhez, me a oar piou ez out-te, ne dout nemed Gwill an Diaoul, eme Wilm morlivet, o tehel kuit gant e vag, retorn d'an ivern, n'houlann ket ober marhad ganit. »

Ar hornandon fall a skrignas e zent hag e nem lakeas da valbouzad droug-komzou ha leou-Doue ken e findaone. Ar pesketaer a zache war e roeñvou hag a bellaas buan diouz ar vouez displijuz... Eun dro d'eur penn-garreg ha setu eñ kuzet.

Neuze 'ta, sklaer e oa evel an deiz e klaske roue an ivern e baka dre e garantez direiz evid an aour. Unan all en-defe kemeret disfi, med Wilm a oa re zallet, soñjal a reas e-noa klevet a-walh hag e hellfe dond a-benn euz e enklaskou heb ober marhad gand Paotr-e-gerniou, hag e talhas da furchal, heb soñjal en oll gonidou en-defe gallet ober o pesketa, o labourad evel kent pa oa mad ar jeu gantañ. Siouaz, mond a ree ar wech-mañ ar stal da Ger-netra, ne vane koulz l'ared mann gand an daou vignon, a-boan m'hellent pourchas o zamm boued, bennoz d'ar park labourer gand Strumpf ha d'ar vuoh bouetet gantañ. Daoust dezo da veza rivinet abalamour da sorhennou Falke, ne lavare Gasparz netra dezañ ; er hontrol, ken doujuz e chome en e geñver evel gwechall pa oa mad ar stal gante, pezh a zegase muih hoaz a c'hoant da Wilm da zond a-benn euz e enklaskou evid digoll e gamarad euz blaz ar re nebeud, a oa bremañ war o bevañs, deut da veza bevaig ha prestig goude bevetez.

Ha bepred e kleve Falke, en e gousk, ar ger-hud « Karmilhan »... A-benn ar fin, dipitet, skuiz o vizeri ha dallet mui-ouz-mui gand e c'hoant didermen d'ar madou, e pegas warmañ eur seurt follentez. Heuill a rafe aliou ar

hornandon, daoust dezañ da houzoud e oa se kregi e lost an Diaoul evid mond primoh gantañ, setu da vihanna ar pez a lavare eur vojenn goz euz an enezenn.

Gasparz a gomprenas an taol-ze e oa ar soubenn o trenki, klask a reas cheñch menozioù e vignon, med ya da, netra d'ober, Falke ne reas van nag ouz pedenn nag aspedenn; 'zo kaerroh, droug a yae ennañ ha 'benn ar fin Strumpf, gand a vad hag a laosk e oa, a asantas mond gantañ ha sikour anezañ.

Dond a reas dour war daoulagad an daou zen pa oent o naska o paourkaez buoh, eur haer a loen bet savet eno ha bet greet brao dezi ordinal. Beteghenn n'o-doa ket asantet gwerza anezi rag ne oant ket evid gouzañv e hellfe beza da unan bennag all. Med Lusifer, hag a oa deut da veza mestr Wilm, a dage en e galon hag en e spered an oll venozioù fur ha Gasparz, evel ma ouzoh, a oa eun tamm paotr a netra na ouie nemed senti.

Deut e oa miz gwengolo ha krog nozvezioù hir goañv Bro-Skos. A-vandennadou e tremene a-uz d'ar pennou koulmoul ponner ha morlivet boutet gand avelaj garo.

Teñval-sah e oa an nozvez-ze, du pod an hentou-striz etre ar menezioù hag an taouarheier latareg o douar gwag. E peb leh e seblanted gweled yeunou spontuz an ivern... Hag an avel a zalhe da c'hoari las, da c'hoari e baotr gouez gand yudadennou skrijuz. Falke a zibabe an hent, war lerb e teue ar paourkaez Strumpf, eur hovah aon dezañ, koeñvet e zaoulagad gand daerou puill peb gwech ma selle ouz al loen paour o vond ken disfiuz d'ar maro, ar maro diouz dorn ar re o-doa pourvezet boued dezi. N'eo ket heb poan e tigouezjont en eun draoniennig kleuzet e-touez ar menezioù, mein a-stlabez enni gand torkadou spoue ha brug, da vihanna e-leh ne oa ket re hleb. Kalz re deñval e oa evid gweled ar menezioù uhel, rust, rohellig ha didud a gelhie, pe dost, al leh distro-ze. Mond a reent a-dastorn etrezeg eun tamm brao a rohell kluchet e-kreig an devalenn ha, p' errujont, diwarni e savas gand kriadeg eur pikol erer. Daoust ha doan a gemeras ar vuoh? Eur vlejadenn druezuz a laoskas, evel m'he-dije santet pegen trist ha digenvez e oa an toull fall-ze ha komprenet e oa deut pred he maro. Ma feiz, an taol-mañ 'vad e ruille daerou Gasparz kaez. Er pellder e veze klevet soroh ar mor. Kustum evel ma oa deut da veza e zaoulagad, e helle Strumpf damverzoud bremañ ar wenodenn veineg o-doa heullet ha kribennou ar menezioù beuzet e koabrennou du-du, du-bran, a veze klevet enne gwech ha gwech all eur strakadenn ponner hag hir. Med, ma Jezuz, stag e oa dija ar vuoh ouz ar roh ha Wilm, savet gantañ e vouhal, a oa o vond d'he laza.

N'helle ket Gasparz gouzañv, muioh ha douja pelloh d'e vignon, koueza a reas war e zaoulin hag e zaouarn juntet a harmas: « En an' Doue, Wilm Falke, truez... truez evidout-te da-unan, truez evid or paourkaez buoh, truez evidom. Na-dez ket da goll da ene ha da vuhez war eun dro. Mar deo red dit droug-ober dirag Doue, gortoz ahann warhoaz. Laz eul loen all bennag, med ne rez ket poan d'or paourkaez buohig!

— Pe sod pe nay ez out Gasparz? a huchas Wilm, rust an tamm anezañ, e vouhal bannet bepred gantañ, mond a rin-me, marteze, evel eur genaoueg, da lezel he buhez ganti ha da vervel me ma-unan gand an naon?

— Ya, moarvad! Ne varvi ket gand an naon keit ma hellin-me trammaillad eun dra bennag gand ma daouarn, labourad a rin evidout a-hed an deiz, med en an'Doue, na-dez ket da werza da ene ha da laza or paourkaez loen.

— Ma! mar deo kont evel-se, eme Falke gand eur vouez truezuz, kemer te ar vouhal ha darho din eur c'hwistad war va hokenn ganti, ne din ket beo ahann ma n'em-bez ket ar pez a c'hoantaan keit all 'zo. Kap ez out-te, ma faotr, da zegas din war horre an dour teñzorioù ar « Harmilhan »? Ha gouest ez eo da zammou daouarn da zeveni ma c'hoant ha da honid netra nemed eun tammig kreun bennag? Defod da veza pinvidig, n'hellan ken me derhel ganti; gand se, Gasparz kaez, deus d'ober ma jeu din ha sko mibin.

— Tao, en an' Doue, Wilm, gra ar pez ah-eus d'ober, sko gand al loen pe darho an taol ganin, ne ran forz, ar pez a fell din eo salvi da ene. Goud' ouzout a-walh eo ar garregenn-mañ aoter ar Bikted hag ar sakrifisoù greet amañ a vez aberzet da roue an Droug hag an Dizuz.

— Me ne ran malloztouen fouter ebed euz kahaj evel-se, a huchas Falke en eur c'hoarzin evel eun diaoul ha n'eus mann d'ober gantañ ken. Sod out Gasparz ha lakaad a rez ahanon ive da goll ma zamm skiant... Med felloud a ra din ober plijadur dit... »

Hag eñ da deurel ar vouhal, da gemer eur mell kontell he beg war e jave: « Defod din, e viri ar vuoh, emezañ. »

Med Gasparz a reas eul lamm warnañ, a ziframmas e venveg digantañ, a dapas krog er vouhal, he bannas hag a zarhoas eur flipad ken rust ha ken nerzuz war benn ar paourkaez buoh ken e kouezas homañ maro-moust dirag he mistri.

Kerkent, eul luhedenn a sklerijennas ehonder an oabl ha war e lerb e tarzaz eun taol kurun spontuz. Falke a oa chomet paf dirag e vignon evel dirag eur bugel greet gantañ ar pez na greder ket ober. Strumpf ne grene ken na dirag Wilm na dindan ar hurunou; heb eur ger, en

em daolas war gorr al loen evid e gignad. Pa oe dibafet Falke, e teuas da zikour Gasparz, med eet e oa da netra, ma oa taer a-raog, bremañ avad en em zante dinerzet lib. E-pad ma oant gand al labour-ze an arne a yee bepred war wasaad, ar houmoul war bonneraad... Klevet e veze bremañ strakadennou spontuz er menezioù hag euzuz e oa gweled niver ha brazder al luhed a daole o bannou war ar roh villiget, war douskan paour an douar ha du-hont en hent striz, eur seurt riboul, e oant tremenet ennañ. E-keit-se, eun avel feulz, ha ne oa ket deut hoaz betek an uheldirioù, a vleje evel eur zod du-hont en traoniennou ha war an aot. 'Raog dond a-benn da beurzi-grohenna al loen, e pizenne hag e ruille an dour war o zal ha peg e chome o dillad oute. C'hwezenn domm pe c'hwezenn yen ? An eil hag eben, moarvad. Leda a rejont ar hrohhenn war an douar ha Gasparz a zikouras e vignon d'en em glenka enni hag a bakas anezañ kloz, evel ma felle dezañ. Neuze, leun a druetz, trelatet an tamm anezañ, ken glaz hag eun delienn-gaol, eh adkavas e deod evid goulenn digantañ en eur grenn :

« Daoust ha gelloud a rafenn renta dit eur servij all bennag, Wilm ?

— Paz an disterra hini, ma faotr-kaez, kenavo Gasparz.

— Ma, kenavo, ra vo truezuz an Aotrou Doue evidout, ra bardono dit evel ma pardonan-me. »

Setu ar gerioù diweza klevet gand Falke. Trolinenn deo Strumpf a deuzas en noz bepred ken teñval hag an arne a zeuas da veza gwasoh-gwaz, biskoaz n'e-noa ar pesketaer na klevet na gwelet eun dourni ken spontuz. E skleur eur sapre pikol luhedenn hirbaduz e hellas spur-manti nann hepken ar menezioù hag ar reier en-dro dezañ, med an draonienn du-hont, ar mor dirollet, gwenn gand an eon, ar pleg-mor gand e inizi hag o herreg, hag en o-mesk petra a welas hoaz ? Petra ? 'Hanta eur pikol lestr iskiz, daouhanteret e wernioù. Ha kerkent, noz-du adarre evel en eur zah, med an taolieu-kurun a zalhe da strakal ken e findaone. A-greiz-oll, Wilm a glevas ragach eun druillad mein a beb seurt ment o ruillal diwar goztez ar menez ha darbet e oe dezañ beza friket gante. Kerkent all e krogas ar glao da goueza evel skei gand eur bezel ha ne oe ket pell an draoniennig da veza goloet gand an dour evel eul lenn, hag ar paourkaez den mailluret en em gavas en dour betek e ziskoaz. Eürusamant e-noa harpet Gasparz e gein ouz eun dorgennig douar, panevert da ze e vefe bet beuzet prim-ha-prim. Kreski a rae bepred an dour hag ober a ree an den paour diouz e wella evid

en em zizaha, med ar hrohhenn-buoh e waske seul-vui ma winke.

Setu an dour erru a-rez e ziskouarn hag e vuzelloù : « Salver benniget ! Echu eo din ! eme ar pesketaer ». Med neuze e klevas a greiz-oll boubou ha fourdouill eur froud-dour tost-tost outañ hag ar varrenn sklaset a ziskennas dioustu a-hed e houzoug : an doureier o-doa gellat, moarvad, distouva eun toull bennag etre diou rohell. Hanter davet e oa bremañ an tourmant, hag ouspenn, war sklaeraad ez ee eun nebeudig an amzer. Ma feiz, distanet eun tammig da Wilm ha spi da addond en e greiz. Daoust dezañ da veza og, prest da fatika ha da zodi gand ar stard e oa e liammou, e komprenas ne oa ket erru hoaz pell a-walh war-du ar pal sanket gantañ en e benn. Med peogwir ne oa ken eskell ar maro o plava warmañ, e selaouas adarre galv nerzuz e c'hoantegez hag e ezom-mou direiz.

Eur predig-amzer a oa chomet dic'houzvez, evel mo-rennet, pa oe dihunet gand flouradenn griz eur barr-avel skornet ha klevet a reas evel soroh gwagennoù. Teñvalaet an amzer adarre. Eul luhedenn par d'an hini a welas kent a sklaerijennas peb tra hag e soñjas dezañ gweled adarre al lestr braz dianavez, pintet da genta war gribell eur wagenn uhel-uhel dres dirag mougeo Steenfol ha goude o vond prim-ha-prim d'ar strad. Chom a ree da zelled trellet e zaoulagad, e-pad ma talhe al luhed da c'hoari las. N'e-noa ket fiñvet, eveljust, diouz e devalenn veineg koachet e-harz treid ar menezioù, brevet e oa ken e oa hag evel seizet e izili. Hiboudi a ree hepken ar mor bremañ hag eun dra all a damgleve : eur zon dous ha relijiel, med izel-izel, ken na soñjas dezañ eh huñvree. Med gwelloh-gwell e intente kana hag anavezoud a reas buan ton eur hantik klevet gantañ ar bloaz a-raog war eur chaluter hollandad. Intent a ree bremañ geriennoù sklaer ha fraez, rag tostaad a ree bepred ar mouezioù, erru e oant zoken en draonienn. Neuze Wilm en em zifretas kement ken e hellas tizoud eur maen e harpas e benn warnañ hag e welas eur brosesion o tond davetañ en eur gana bepred an hevelep kantik. Liou ar spont hag an anken a lenne war dremm an dud dianavez hag o dillad e tivere an dour dioute. Setu int en e gichenn hag ar han o paouez. Sonerien a gerze e penn-araog, goude e teue eun toullad martoloded ha war o lerh eur sapre pez den, gwisket faro e giz gwechall-goz, aroudennou aour war e zillad, eur hleze ouz e goztez hag en e zorn eur gaer a vaz aotrou gand eur bomellenn aour ha n'helle dond nemed diouz Bro-Indez. Gwech ha gwech all e kemere diouz daouarn eur morillon yaouank eur horn-butun hir-hir.

Goude beza tennet eur pennad war ar horn-ze gand kalz a fesonou, e tostaas ouz Wilm hag e chomas dirazañ reud evel eur pipi. Aotronez all gand kerniou disterroh a oa en-dro dezañ. Tud all a zeue dreke, en o zouez meur a vaouez seblant pinvidig warne, med gwisket koz ; darn e oa bugale vihan war o divreh pe e-pign ouz o davanjer. Er penn pella, eur strollad merdidi hollandad liou ar butun war o genouiou a zivogede enne beb a gorn berr ha rouz.

Ar pesketaer a zelle gand daoulagad dilontet ouz ar bodad tud iskiz-se, med ne golle ket kalon engorto ouz ar pez a oa da zond. Chom a ree an oll dud-se en-dro dezañ en eur vutunad gand berniou moged a guze ar stered ouz ar paourkaez Wilm. Hemañ a oe kelhiet gante ha derhel a reent da dostaad outañ heb paouez da deurel moged a ree bremañ eur goumoulen deo. Falke, evel ma ouzoh, ne oa ket eur hrennard spontig, goud'ouie e oa eun darvoud iskiz bennag da c'hoarvezoud gantañ med evelket pa welas an engroez sioul ha mud-se o kerzed davetañ, goustadig med hep ehan, evel ma vefe bet o vond da vaha ha da frika anezañ, e kollas e benn hag eur c'hwezenn yen a bizennas war e dal. Trei a ree sellou dispourbellet en-dro dezañ. Ha piou a welas a greiz-oll ? Piou ? Ahanta an asez foerer koz gand e vri krog-nostro, gwisket en melen ha havet gantañ en aot. Azezet e oa ar hornandon fall just dreg e benn, ken difiñv hag en e vag, med e vutune eñ ive hag e seblante goapaad an dud bodet en-dro dezañ.

Ma oa tenn a-raog war ar Skosad, e galon a yeas neuze da netra hag eñ da glemm en eur zelled ouz paotr e gleze hag e gorn hir-hir :

« En ano an hini emaoñ o senti outañ piou oh c'hwi ? Petra a glaskit en-dro din ? »

Muih meurdezuz hoaz eged a-raog, setu an aotrou da denna teir gwech war e gorn, d'e rei d'e floh ha da respont disaouzan, yen, yen-sklas :

« Me eo Aldred Franz Van der Swelder, kabiten-meur al lestr « Karmilhan » euz Amsterdam, goueledet gand e oll dud ha peadra e-mesk kerreg an enezenn-mañ, pa oa o tistrei diouz Batavia ; setu amañ va ofiserien, an drei-zidi ha va martoloded ken kaloneg. Oll eta ez int bet beuzet ganin. Perag ez out deut te d' on tenna diouz goueled ar mor ? »

— Taoe 'zo, me a garfe gouzoud just a-walh peleh eo kouezet teñzoriou ar « Harmilhan ».

— E foñs ar mor.

— Ya, med peleh ?

— E mougeo Steenfull.

— Penaoz e hallfen o zapoud ?
— An evned-mor a spluj evid pourchas o zamm boued. Daoust hag eñ n' o-defe ket teñzoriou ar « Harmilhan » kement a dalvoudegez ?
— Pegement a hellin kaoud ?
— Muih eged ne helli dispign. »
Ar hornandon melen a vousec'hoarzas ha klevet e oe c'hoarz ha sklok en-dro dezañ.
« N'eh-eus mann da houlen ken ? eme ar habiten.
— Seurt ebed. Kenavo !
— Yehed dit, ma faotr, ha ken' e vi gwelet, eme an Hollandad. »

Ar zonerien a adkemeraz penn ar brosesion a yeas kuit evel ma oa deut en eur gana ar memez kantik. Dre ma bellaent ez ee an ton war izelaad ha dambrest ne oe klevet nemed sourradenn ar mor.

Neuze Wilm a stignas e izili gand e oll nerz evid gel-loud en em zisaha. Distaga a reas unan euz e zivreh ha goude e hellas diskoulma ar gordenn ha difluka diouz ar hrohenn.

Heb chom da zelled en-dro dezañ, eñ gand ar foeltr beteg e dammig ti e kavas ennañ Gasparz, ledet e gorr heb anaoudegez. Poan e-noe o lakaad anezañ da addond e-barz. Strumpf a ouelas gand al levnez oh adkavoud e vignon. Med an tamm plijadur-ze a oe krennet dezañ buan p' en em lakeas Wilm da gonta ar pez a felle dezañ ober bremañ :

« Kentoh eged chom da vizeri en tamm paourkaez lochenn-mañ, en em daolin war ma fenn en ivern, ha red eo din mond dioustu, gra-te evel ma kari. »

Hag eñ o kemer eun torchad, eun direnn, eur gordenn hir hag o sacha e skasou gantañ. Gasparz d'ar red war e lerh. Gand poan e hellas tremen e gov e toullig an tevenn. Wilm a oa dija war ar pikol rohell kavet gantañ an deiz ma oa deut da repui amañ. Staget e gordenn gantañ, e oa dare d'en em lakaad da ruza er poull-tro a veze klevet an dour o virvi ennañ. Pa gomprenas Strumpf e oa ker-koulz dezañ bouta e vri e-leh ma lavaran deoh evid klask furaad e vignon, e fellas dezañ ; e heuill. Med Falke a roas urz dezañ da jom e-leh ma oa ha da zerhel krog er gordenn. Ne gontin ket deoh pegement a boan a gemeras Wilm war ar herreg gleb, ramp pe skoselleg, en toull-ivern don ha teñval-ze... Nann, ne gontin ket, red e oa dezañ beza sodet e benn gand e c'hoarie las eta dindannañ. Dre forz selled ha furchal, ar pesketaer a welas a-benn ar fin eun dra bennag o luha en dour. Eur splujadenn. Sacha a reas war benn eun dra ponner... Ma

feiz, deut e oa e daol da vad, degaset e-noa gantañ, pichoñs, eur hasedadig peziou aour, pez a youhas d'e gamarad a bedas hag adpedas anezañ da zistrei d'an neh ha da jom heb klask pelloh. Echui gand kennebeud-se a dra, ya, moarvad! Er hontrol, peogwir e oa, a-benn ar fin, kouezet war ar plas mad, e vefe eun tamm brao a henaoueg o chom heb derhel gand e enklaskou. N' eo ket sod e oa e gwirionez, med nay, rag spluja a reas eun eil gwech en islonk, ar paourkaez. Klevet e oe war ar mor tro-dro eur c'hoarz goapauz. Abaoe den n'e-neus adgwelet Wilm Falke beo.

Gasparz a zizroas e-unan d'ar gêr, eur struj en e gerhenn. Kalon-vad evel ma oa, e-noe kement a hlahar ken ne badas ket e dammig spered, koll-lib a reas e skiant. Da netra ez ee ar paourkaez paotr a veze gwelet o foeta hent noz-deiz, sellou trelatet dezañ. Truez a gemere an dud, med den ne grede evelkent tostaad ha soursial outañ.

Petra a lavar in deoh evid echui? Ahanta, eur peske-taer, hervezañ, a welas, eun nozvez a dourmant, Wilm Falke emesk martoloded ar « Harmilhan », war an aot. Ar pez a zo sur, goude an nozvez-se ne oe ket gwelet ken Gasparz Strumpf. Klasket e oe gand aked, roud ebed ne oe dizoloet outañ. Ha setu ar vrud a red abaoe : eet eo da adkavoud e vignon hag o-daou emaint gand tasman-tou ar « Harmilhan » a vez adgwelet bremañ gwech an amzer dirag mougeo Steenfol.

KANAOUENNOU

savet gand Anjela DUVAL ha Fanch DANNO

Barzoneg : Anjela DUVAL

Ton : Fanch DANNO

Sioul, e ti - rollez, o Leger, da ruban voulouz du,
Gwe - chall, bu-ga-le seder, a vilin da vi - lin,
E kreiz-tre ar pradeier, gwez pu - pli a beb tu.
Ni a leu - nie da bradeier, gand or c'hoarzhou lirzin.
Hi - boudi ra da zouriou o ruillal dreist ar sklu-ziou,
Hag, azezet war da riblou, ni 'gonte or he-vri - nou,
Hag, a bell, te 'luskell din va huñ-vre-ou.
Uz d'ar froud o hiboud, ni ree huñ-vre-ou.

KAN D'AL LEGER

Sioul, e tirollez, o Leger,
Da ruban voulouz du
E kreiz-tre ar pradeier,
Gwez pupli a beb tu.
Hiboudi ra da zouriou
O ruillal dreist ar skluziou
Hag a-bell, te 'luskell
Din va huñvreou !

Gwechall, bugale seder,
A vilin da vilin
Ni a leunie da bradeier
Gand or c'hoarzhou lirzin.
Hag, azezet war da riblou,
Ni 'gonte or hevrinou.
'Uz d'ar froud o hiboud,
Ni ree huñvreou !

Na pegen koant da vilinou,
'Hed an draonienn, ken stank,
Na kana ree da skluziou
Gwechall p'edon yaouank.
Hag, a-grap da dosennou,
Chapeliou ha maneriou.
Kant kastell, kant tourell,
Koant 'vel huñvreou !

Pa rin-me ma hun diweza
 Dindan an ivinenn,
 Ha pa vo 'n avel o c'hweza,
 Sonjin c'hoaz en draonienn.
 Me a glevo boud da zouriou
 Me 'glevo kroz da skluziou,
 Du-hont, pell, o luskell
 Din va huñvreou !

Koz-Varhad, 29-10-1963

Barzoneg : Anjela DUVAL

Ton : Fanch DANNO

$\text{♩} = 132$

Gand feiz ha gand spi bemdez 'hortozan, Va ha-lon o tal-mi,
 'n hi-ni ga-ran. Gand feiz ha gand spi, bem-dez hor-to-zan Ar
 joa, al levenez a zeuy gan-tan. Ha gwe-loud ran mil, ha
 gweloud ran kant, Med e-vid hi-ni ma ha-lon ne lamm. Ha gweloud ran
 mil, ha gweloud ran kant, Ken vez di-ra-zon an hini 'garan!

'N HINI KARETAN

Gand feiz ha gand spi bemdez 'hortozan,
 Va halon o talmi, 'n hini 'garan.
 Gand feiz ha gand spi, bemdez 'hortozan
 Ar joa, al levenez a zeuy gantan.
 Ha gweloud ran mil, ha gweloud ran kant ;
 Med evid hini ma halon ne lamm.
 Ha gweloud ran mil, ha gweloud ran kant,
 Ken vez dirazon an hini 'garan.

Ha dond ray hirie 'n hini karetañ ?
 Ken na vez degouezet, tamm ne vevan.
 Ha dond ray hirie 'n hini karetañ ?
 Levenez ha joa a zeufe gantan.

Ha dond rafe mil, ha dond rafe kant,
 D'am halonig paour ze ne rafe mann.
 Ha dond rafe mil, ha dond rafe kant,
 Ma ne zeufe ket 'n hini karetañ !

Siwaz n'eo ket deut 'n hini 'hortozan
 Da rei eun tamm nerz d'am halon ken gwan !
 Siwaz ! n'eo ket deut 'n hini 'hortozan
 Da rei d'am halon al levenez hlan.

Ha dond rafe mil, ha dond rafe kant,
 Bepred e chomfe ma halon ken gwan
 Ha dond rafe mil, ha dond rafe kant,
 Peogwir n'eo ket deut 'n hini karetañ

Klañvdi Lanuon, 27.10.1966

Barzoneg : Evnig PENN AR C'HOAD

Ton : Fanch DANNO

Eet eo an heol da gousked er mor don, Klevet em eus
an anje-luz o son. Kousk a greiz ka-lon, va mi-gnon!
E-mañ 'n o neiz oll ev-ned Penn ar Roz, Kousk va ma-big
en goudor on ti kloz! On ti kloz!

KOUSK BREIZADIG

Eet eo an heol da gousked er mor don,
Klevet em-eus an anjeluz o son.
Kousk a greiz kalon, va mignon !
Emañ 'n o neiz oll evned Penn Ar Roz
Kousk va mabig en goudor on ti kloz !
On ti kloz !

Mor hag avel a hourdrouz heb ehan.
Arabad ouz o moueziou ober van !
Rag da vamm vihan dit a gan.
Skedi a ra ar stered 'uz d'on fenn
Kousk 'n eur vouchoarzin laouen em hichen !
Em hichen !

Evid gonid bara gwenn din ha dit,
Pell du-hont da dadig paour zo eet kuit.
O va bugelig ken koantig !
Ennom on daou, deiz ha noz, eh huñvre.
Kousk pôtrig hag huñvreom ni ive !
Ni ive !

Ha marteze, mabig aour ken karet,
Araog ma vim ni on daou dihunet,
Tadig a vezo distroet

Va Breizadig, kousk ervad da hortoz !
Da hortoz !

Perwenan, 15.10.1964

Ton ha son : Fanch DANNO

En Tregas-tell, war an dosenn, 'uz d'ar re-ier ha d'an traez,
Me 'm-eus sa-vet eun ti bi-an, e- u-na-nig, war ar maez.
Ar goeli-ni hag ar skreved 'zeu d'an nij beteg toull va dor
Ha me 'm-eus, 'vid va luskellad, kan an avel, trouz ar mor.

EN TREGASTELL

En Tregastell, war an dosenn,
'Uz d'ar reier ha d'an traez,
Me 'm eus savet eun ti bihan,
E-unanig war ar maez.
Ar goelini hag ar skreved
'Zeu d'an nij beteg toull va dor
Ha me 'm eus 'vid va luskellad,
Kan an avel, trouz ar mor !

Na bloaveziou 'm-eus tremenet
'N eur gêr vraz, pell diouz va bro !
N'am-eus kavet an eürusted
Med aboe on deut endro.
Barz va bag, pa c'hwez an avel,
En eur astenn va goueliou gwenn
Me a gan soniou Breiz-Izel
E brezoneg, a bouez-penn.

Pesketerien Bro Lanuon,
Deuz Ploumanac'h ha Porz Gwenn,
A welan, amañ pe du-hont,
En dro d'ar Seiz Enezenn.
Fin an deiz, war an inizi,
Sioul an noz a led he mantell
Touriou tan 'grog da lugerni
A beb tu, war an dremmwel.

Ganin-me, va muia karet
A zo ken joañz ha me ;
Rag on daou om bet unanet
Gand trubuillou ar vuez ;
Ha da hortoz ar baradoz
Gand e zent ha gand e aelez,
Ni on-eus kavet ar repos
En eur vro a garantez !

Perroz, 30.8.1964

Ton ha son : Fanch DANNO

Se-tu e-chu va de-vez, so-net an an-je-luz Hag,
en tu all d'ar me-nez, an heol o vond da guz. Ro
peoh, e-ta, va halon! Re greñv sko-ez en-non! Fli-
-ja-du-riou ar bed-mañ n'int ket greet e-vi-don!

GWERZ AR MILINER

Setu echu va devez, sonet an anjeluz
Ro peoh eta va halon ! Re greñv skoez ennon !
Plijaduriou ar bed-mañ n'int mui greet evidon !

Hag, en tu all d'ar menez, an heol o vond da guz.
Pa droan va daoulagad etrezeg ar vilin
Ne welan den mui, siwaz, a rafe din eur sin !
Ne welan ken va mignon, Erwan, va harantez ;
Rag eet eo da vrezeli abaoe warlene !

Rag eet eo da vrezeli, kaset d'ar broiou pell.
Ranket e-neus dilezel e vro gaer Breiz-Izel.
Ranket e-neus dilezel ar paour kêz plahig koant
A zo chomet heh unan gand ar brasa tourmant.

En noz, pa luh ar stered a-uz d'ar hoadig pin,
'Vid luskellad va hlahar e ran tro ar vilin.
Amañ, 'veze o poania euz ar beure d'an noz.
Amañ 'teuem d'azeza on daou war ar bank koz.

Selaouit, Gwerhez Vari, c'hiwi, mamm leun a druéz,
Selaouit mouez eur plahig eo mantret heh ene,
Pa houlenn a greiz kalon, bemnoz, war he daoulin,
Ma teuo endro Erwan d'ar gêr, barz e vilin !

Perroz, 14.8.1963

Ton ha son : Fanch DANNO

An nevez-hañv zo er-ru-et! An nevez-hañv zo er - ru -
-et! 'Mañ daou ha daou al lapoused, 'Mañ daou ha daou al lapou-
-sed! Gwisket a-nevez ar hoajou, Fichet al lanneg gand bleu -
-niou, Gwisket a-nevez ar hoajou, Ha balan aour war ar hleuziou!

AN NEVEZ-HANV ZO ERRUET

An nevez-hañv zo erruet (2w)
'Mañ daou ha daou al lapoused ! (2w)
Gwisket a nevez ar hoajou,
Fichet al lanneg gand bleuniou,
Gwisket a nevez ar hoajou
Ha balan aour war ar hleuziou !

An drask a c'hwitell d'ar mintin (2w)
Ha kan ar voualh a zo lirin. (2w)
Krog int da sevel o neiziu
E donder glaz an oll vodou.
Krog int da sevel o neiziu
Evid o lapousedigou !

Ar pardonioù a zo digor. (2w)
'Mañ ar merhed war doull o dor. (2w)
Mond a ran buan da bedi
Va dous da zond warhoaz ganin.
Mond a ran buan da bedi
Janig da bardon Logivi.

-Janig, pegoulz 'teui ganin (2w)
Dirag an aoter da zimi ? (2w)
Gand kalon ha gand karantez
Ni a savo eun tiegez.
Gand kalon ha gand karantez
Ni a gavo al levez !

Janig, siwaz, n'eo ket 'vidon, (2w)
 Ha setu rannet va halon ! (2w)
 Trohet eo va nevez-amzer
 Trohet eo va nevez-amzer.
 Moulbig, da gan a zo dister !
 Trohet eo va nevez-amzer.
 N'eus den ouz va gortoz er gêr !

Perroz, 20.10.1966

ÉDITIONS - TARIFS 1967

I. ETUDE DU BRETON

STEPHAN-SEITE	: Geriadurig. Lexique Breton-Français et Français-Breton	6,00 F
	Le Breton par l'Image (2 ^e édition)	6,00 F
	Le Breton par l'Image (Vannetais)	6,00 F
	Deskom Brezoneg (Méthode)	9,00 F
J. TRICOIRE	: Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg	
	1 ^{re} Partie (épuisé ; réédition octobre 1967)	
	2 ^e Partie	19,50 F
P. TREPOS	: Cent textes français à traduire en breton	3,00 F
	Le Pluriel breton	15,00 F

II. RECUEILS DE CHANTS BRETONS

	Kan ha Diskan — Gavottes de Bretagne	4,00 F
	Kanaouerinou ar Beilladegou — Veillées du Trégor (34 chants, texte et musique)	5,00 F
A. DUVAL E. PENN AR C'HOAD et F. DANNO	: Soniou nevez Bro-Dreger (25 chants)	3,00 F

III. ŒUVRES LITTÉRAIRES

T. MALMANCHE	: Gurvan, ar Marheg Estranjour (Edit. sur beau papier)	9,00 F
J. RIOU	: Geotenn ar Werhez	4,00 F
J. KERRIEN	: Ar Roh Toull	4,00 F
F. LE LAY	: Bilzig (Extraits pour les écoles)	2,50 F
	Bilzig (Edition complète illustrée)	13,00 F
P.-J. HELIAS	: Mojennou Breiz. War drez ha war veg (Belle plaquette. Photos J. Le Doaré)	5,00 F
	Marvailhou ar Votez Tan	5,00 F
	Pevar Bezig Choari (4 pièces)	4,00 F
	Maner Kuz — Manoir Secret (Poèmes bilingues)	12,00 F
	Divizou eun amzer gollet — Devis d'un temps perdu (70 chroniques bilingues)	12,00 F
MAB AN DIG	: Karantez (Nouvelles)	4,00 F
	Kizier Noz Sant Pabu (Roman)	4,00 F
E. AR BARZIG	: Kôziou Tintin Mari (Contes du Trégor)	4,00 F
	Kalonou Tregeriad (Nouvelles)	4,00 F
Lan KERGALL	: Mevel ar Garantez (Roman)	4,00 F
REUN AR MOUGN	: Barzonegou (Poèmes)	2,00 F
R. BROUDIG	: Gand red an dour	2,00 F

IV. OUVRAGES EN FRANÇAIS (Linguistique, Histoire littéraire)

L. BLOKLANDER	: Arlequin dans le théâtre breton	15,00 F
P. TREPOS	: Le Catholicon de Jehan Lagadeuc	3,00 F
J. GROS	: Le Trésor du breton parlé (Eléments de stylistique trégorroise), 1 ^{er} tome, 260 pages	25,00 F

V. ALBUMS ILLUSTRÉS EN COULEURS, POUR ENFANTS

	Mirzin-Mirzinig (Merlin-Merlot)	4,00 F
	Alanig hag e droiou-kamm (Les tours de Renard)	4,00 F

Les règlements sont à faire au nom de : Fondation Culturelle Bretonne (Editions).
 B.P. 17 Brest - C.C.P. 380-96 Rennes.

“ SKOL VREIZ ”

“ L'ECOLE BRETONNE ”

Kelaouenn gelennouriez e galleg hag e brezoneg

Komanant-bloaz (10 niverenn) 10 L. da gas da :

Instituteurs et Professeurs laïques bretons, Brest

K. R. P. 1-125-16 Roazon

Ha prenet ho-peus leor Jules GROS « **LE TRESOR DU BRETON PARLE** » ? Hastit buan, rag e ya founniz er-mêz. 25 Lur da gas da G.R.P. Emgleo Breiz 380-96 BP 17 Brest.

*Forz war pe zachenn e stourmit,
ne hellit ket tremen heb lenn “ BUEZ BREIZ ”*

“ LA VIE BRETONNE ”

Kelaouenn renet gand J. MARTRAY,
a zegas beb miz eun danvez studiet-piz war gement kudenn
a zo o selloud ouz Breiz.

Brezoneg a vez e peb niverenn

Komanant-bloaz (10 niverenn) : 20 lur

K. R. P. 1894-85 Roazon - 1, stréd Poullain-Duparc - Roazon